



Imboorich

Niverenn 70
31 Here 1975

I M B O U R C ' H , K E L A O U E N N B O L I T I K E L

C'hwec'hvet bloavezh

Niverenn 70

30 Here 1975

Darvoudoù an hañv hag an diskar-amzer.....	p.245
Rakkemenn d'an daou bennad da heul.....	p.253
Silvidigezh kevredigezhel d'ar bed.....	p.257
Ar goanag kevredigezhel ha mennoziou kempred..	p.263
Atodenn.....	p.267
Notennoù diwar-benn tuad an hengounelouriezh..	p.269
Diell a-zivout divodadur Y.P.B.....	p.275
Dre ar bed.....	p.285
A-dreuz lenn.....	p.293
Notennoù diwar-benn armerzh Breizh.....	p.303

Koumanant-bloaz : 35 lur. KRP : Y. Ollivier, 1534 25
Roazon. Deraouñ a ra ar c'houmanant e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 7 lur. Ar pennadoù a zo da gas
da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud, 35 000 Roazon
CPPP : 50 015

DARVOUDOU AN HANV

HAG AN DISKAR-AMZER

Morgousket a-walc'h e oa an Emsav hag al luskad brezhon abaoe daou vloaz bennak. Goude bleuniadur hag entan deroù ar bloavezhioù seikont - savidigezh stolloù ESB, SAE, SKB, Leur Nevez, SAV-BREIZH, SAV, CAB, STOURM BREIZH, 'Brezhoneg Yezh vev', ar c'helaouennoù 'Evid ar brezhoneg', 'Pobl Vreizh', diorreidigezh ur PSU hag ur PS a-du mui pe vui gant mennadoù an emsav, kreskidigezh ar rummoù kentelioù prevez ha kefridiel er skolioù gall, - ez eus deuet un tamm spanaenn ha dichal en obererezh al luskad brezhon : ESB o tankeal hag o koazhañ, SAE o tilezel he mennadoù emsavel evit en em reiñ d'ul labour tarañverezh yezhelour, SAV ha 'Kuzul ar brezhoneg' o tastornat hag o klask o hent hep e gavout, SKB o tizeriañ, 'Evid ar brezhoneg' rediet da rouesaat he mareadegzh ha dic'houest da stummañ stourmerion, 'Pobl Vreizh' strobet gant ur skritur luziet hag enket d'ur c'hazetemerezh elfennel ha d'al luganoù. Moarvat eta ez eo aet un tamm war-raok al luskad brezhon hogen dre ma ra diouer re alies ar mennozhioù, ar preder, ar furnez hag ar genurzh - war wall lorc'h hag emgerc'h pep strollig - n'eo ket bet gouest da zedennañ stourmerion nevez talvoudus ha pep gronnad a chom gant an hevelep izili ha c'hoazh, ar re-mañ o rannañ o obererezh alies etre meur a stroll ne zeuont ket a-benn da lakaat hini ebet anezho da greskiñ. Gwir

eo ez eus bet renet un arnod unvaniñ deurus e ser kendeuzadur SAV, CAB ha STOURM BREIZH hogen er FASAB, - lakaomp, n'eur ket bet c'hoazh evit termeniñ pennvonioù ur politikezh sklaer ha dre se n'eo ket kredapl e tizho ar strollad nevez ober berzh a-barzh pell. Ne weler ket mat zoken war beseurt dezrann eus ar saviad politikel e Breizh eo diazezet mennad ar stourmerion o deus roet lusk d'ar FASAB ; e gwirionez e ra diouer e Breizh ar c'helaouennoù dezrannañ politikel, ma lakaer a-gostez IMBOURC'H hag EMSAV ha c'hoazh, houmañ o tisprizout a-grenn al luskad brezhon hag o kreizennañ he dezrannerezh war zanvez treut un ESB tasmante evit ar poent ne c'hell ket degas kalz skoazell d'ar stourmerion vrezhoneger.

Gwashaet eo c'hoazh an dizurzh ledemsaer-mañ gant emell ur feulster diatebek e Breizh pe, zoken, er 'c'hwec'h korn'. Brudet eo bet gobidell Aleria e Korsika e miz Eost ha kent plediñ gant aferioù Breizh e karfen gouestlañ ur geriennoù d'an darvoudoù er vro-hont. Moarvat o deus skoet ar speredoù dre maz eus bet lazhet archerion en o ser e-kerzh ur c'hrogad (ha da heul ez eus bet bac'het un toullad brogarourion ac'halesont). Padal, evito da vezañ fromus n'o deus ket bet an degouezhennoù-mañ, d'hor soñj, kement a bouez ha ma karfed reiñ dezho : ur gwallzarvoud ez eo bet, moarvat an droukvarvoù-mañ, evel maz eus miliadoù war an hent bep bloaz; n'eus bet anezho e nep keñver heuliad un darsaverezh kenurzhiet. Diskouezet o deus an darvoudoù-mañ dreist-holl e talc'he al levierion c'hall a vremañ kement

hag o diaraogidi da vojenn ar 'Frañs-unan-ha-dirannus' hep kaout evit keloù se talvoud gwirion ebet da zifenn. Iskis e oa eta klevout ur maodiern gall o komz eus difenn ar 'sevenadur' e ser'mirout an urzh' e Korsika. Ne weler ket mat peseurt 'sevenadur' a zo da ziwall e bro ar varc'h-adourion ganolioù hag ar genderc'herion filmoù hudur (lakaet a-hend-all ned eo sevenadur ar C'hallaoued nemet un arvez eus sevenadur ar C'hornog penn-da-benn er maremañ). A-benn ar fin ned eo ar Stad C'hall er grez-mañ nemet un uniad-difenn lazoù unanel led-stadel ha stadel, diouzh ma ned eo houmañ nemet un dastumad gladdalc'helezhioù derc'houezet gant ar maodiernezhoù a ampar anezhi.

Distroomp da zegont Korsika avat. Er vro-hont enta, evel e Breizh, ned eo ket ar boblañs c'hoazh, a gav deomp, gouest da sammañ he zonkadur. Moarvat, en div vro ez eus gennadoù eus ar boblañs a ersav taer a-walc'h ouzh gwaskerezh hirbadus ur Stad a zo mennet da ober eus o douar mirvaoù touristel ha kreizvaoù milourel hogen n'eus amañ evel a-hont emsav ebet gouest da velestrañ ar vro. Ersavioù anienel hag emdarzhek eo en em ziskouez du-se evel du-mañ, daoust maz int bet feulsoc'h en enezenn-hont eget el ledenez-mañ. Bez ez eo Aleria enta azon un diaezamant e-touez poblañs ur rambarzh trobarzhel kentoc'h eget embregadenn un emsav kenurzhiet bennak.

Kemendall a c'heller lavarout a-zivout an tarzhadennoù a zo bet aozet e Breizh e-pad an hañv tremenet a-enep da gannaded c'hall eus ar gostezenn 'dehoù', pe, mar karer, hervez ar yezh politikel c'hall, annaded ar 'Muianiver'.

Stroll ebet n'en deus kemeret ar gwalldaolioù-mañ war e choug ha dre se ez eo diaes gouzout gant piv int bet sevenet e gwirionez. Pezh a ouzer eo n'int ket bet diarc'het gant an urzhiadur - maz eus anezhañ - a ra anezhañ e unan FLB-ARB. Bez ' c'heller empennañ enta ez int bet kaset da benn gant oberourion digenvez nemet douget emichañs d'un doare kleizelouriezh peogwir ez eus bet taget kannaded 'virelour' nemetken. Arouez un oberouriezh kleizelour-rannvroelour ez eo enta an tarzhadennoù-mañ. Ur seurt politikerezh spontañ a rofe a-walc'h da grediñ e ve a-walc'h kas kannaded eus 'Unvaniezh an Tu-Kleiz' da Baris evit ma vefe diskoulmet, evel dre vurzhud, kudennoù ar Vrezhoned. Moarvat oc'h en em gemer ouzh dehoudi c'hall e sache aozerion an taolioù grad-vat ar gleizidi c'hall a-du ganto (e devoud n'o deus ket ar re-mañ savet nemeur o mouezh a-enep d'an tagadennoù-mañ) hag a-se o deus o lakaet kenwall ganto en ur stumm bennak. Hogen peseurt gounida zo bet e kement-se evit ar mennoz broadel e Breizh? Maz eus bet unan ez eo bet dister meurbet. Ul lodenn vat eus ar boblañs a chom a-du gant ar c'hostezennoù 'mirelour' ha seurt gwalldaolioù ne c'hellint nemet he broudañ a-enep d'an dispac'herion. Evit ar gleizidi, gwelet a-walc'h eo bet penaos o deus klasket atoriñ an darvoudoù evit kas war-raok an daelerezh gall etre kostezenn dehoù ha kostezenn gleiz. An disoc'h eus kement-se eo ez eo bet sigotet kuit pezh a zlefe bezañ pennañ amkan an Emsav : adober eus Breizhiz ur gumuniezh politikel rez.

Ur wech ouzhpenn enta e ranker lakaat ar stourmerion

vrezhon war zivall ouzh atoridigezh o stourm gant impalaourion estren o ren ur seurtanvet 'stourm etre renkadoù'. Moarvat ez eo ar stourm etre renkadoù un devoud e Breizh evel er broioù all - se zo anat a-walc'h - ha diskouez a c'hellfed penaos ez eo rannet ar gevredigezh vreizhat arallek hiziv an deiz etre rummoù diforc'h ha dezho pep a stuzegezh arbennik ken em sant izili ur rumm estrañjourion e-keñver izili ur rumm all (e rez an Iliz ez eo anat a-walc'h an dra-se, a gav deomp). Hogen ma kemerer degouezh Euskadi en hañv-mañ, lakaomp, e welimp penaos ar stourmerion fuzuilhet er miz tremenet o deus roet tro e Bro-C'hall hag en Europa da sevel a-enep da Franco kentoc'h eget da skoazellañ en un doare efedus an emsav en Euskadi. Arguziñ a c'heller, eveljust, ez eo ar c'hemm renad e Madrid an ampleg 'sine qua non' da zieubidigezh ar vro-se. Moarvat. Hogen sklaer a-walc'h eo ivez n'eo ket an ampleg-se un ampleg 'trawalc'h', pell emañ zoken. Ha pezh a zo dañjerus dres eo e ve graet eus ar c'hemm renad eunan, ur pal gant ar re a ra van da harpañ Euskariz, evel maz eo c'hoarvezet pemp bloaz zo da geñver prosez Burgos. Rak n'eo ket fur krediñ e vo kalz aesoc'h da Euskariz, lakaomp, tapout ar frankiz dindan ur renad 'frankizour', - sañset, -- eget dindan ar renad belielour a vremañ ; a-walc'h a skiant-prenet hon eus war ar poent-se e Breizh hag e kenelioù all ar 'c'hwec'hkogn'. N'eus nemet stadañ ersav diskiant al levierezh gall e Paris ouzh darvoudoù Korsika ha Breizh evit meizañ n'eo ket a-walc'h erlec'hiañ ur renad 'werinveliel', a-hervez, ouzh unan vac'hom evit reiñ lusk d'un argerzh digreizennañ galloud

ha kevreadelaat (1). Da lavarout eo, ar galloud kreizennet e unan eo a zo kiriek d'ar gwaskerezh a-enep d'ar broadoù suj kentoc'h eget an doare maz eo embreget ar galloud-se.

Un arvar all a zo a-hend-all o plegañ da genlabourat gant kostezennoù kleizour ha kleizelour ez eo bezañ degaset da sujañ dezho en un amdro dispac'hel o degasfe, e degont o zrec'h, da ziazezañ 'groñsveli an Dic'hladiezh' a zo kreizennelour dre ret ha dre natur, hag hep gortoz pelloc'h, hemañ ez eo bet tonkad ar stroll 'ez-vroadelour' NI e Breizh. A-benn ar fin en defe an emsav da dalañ ouzh ur galloud dispac'hel yaouank ha kalz taeroc'h eget an hini frankizour kozh uzet hon eus bet betek henn ; seurt galloud dispac'hel ne lezfe chañs ebet d'an Emsav. Arabat eo enta d'ar Vrezhoned adober ar sotonioù o deus graet endeo oc'h harpañ an dispac'herion vourc'hiz c'hall e 1789.

Hogen ar mac'herezh a zo bet renet a-enep d'ar vourarourion vrezhon e-kreiz miz Here a laka unan d'ober soñjoù ivez. Anat eo, eveljust, ez eus bet anezhañ un taol aner skoet e-biou hogen diskouez a ra ivez e c'hell ar gerreiz ober tost-da-vat pezh a gar en ur renad emanvet frankizour : derc'hel an dud en dirgel e-pad ur sizhun, furchal en o zi hep gwarant ebet a-berzh al lezenn hag en o ezvezañ a-wechoù, enkiriegan ne vern piv gant un danvez-tamall ken tanav ma soñjo unan emeur distroet en amzer al "lizhiri-sie

(1) Kounomp a-hend-all pebezh brezel (gant bourevierezh h.a. a zo bet renet e-pad gant ur renad 'frankizour' - sañset - en Aljeria.

Ken splann eo kement-se maz eo bet merzet zoken gant kelaouennoù evel "Ouest-France" a verke dres en deizioù-mañ e oa diaes tamall danvez barnidi evit bezañ adsavet ur c'hevre bet divodet moarvat hervez lezenn hogen n'eus prouenn ebet e vije bet biskoazh un aozadur frammet ha kenurzhiet anezhañ, - pe, da vihanañ, a zo dianav a-grenn. Soñjet unan en implij a c'hellfe ober eus seurt hentenoù ur renad a zistaolfe betek maskl ar frankiz hag ar werinveliezh ; kounet ivez penaos ez eo bet lazhadeget dalc'hidi an emvel-estrezhe traonienn ar Roen en amzer Hitler ha penaos ez eus bet graet ouzh bihanniveroù broadel an URSS e-pad ar brezel diwezhañ. En degouezh-mañ, dres, oberourion eus strolloù sevenadurel eo a zo bet trubuilhet, pezh a ziskouez ivez ez eo ar barnerezh hag ar gerreizh e Bro-C'hall, dindan ur renad gwerinveliel, hollc'halloudek e gwirionez pa vez anv a 'zifenn ar Stad' (daoust ha furchet e vez e ti n'eus forzh peseurt keodedour bewech ma vez graet ur skrapadenn en ur bank bennak - ha se a c'hoarvez bemdez, ?)

Peseurt kentel a zlefe an emsav tennañ eus an darvoudoù-mañ ? Da gentañ, ez eo diboell tabutoù zo diazezet war veziadoù ar politikerezh gall pe war gevezerezh an aozadurioù hag ar renerion ; kevarzhet eo izili an holl emsav, pe e pij dezho pe ne ra ket, - ha drè se e tlefent diskouez muioc'h a zamant an eil e-keñver egile ; ne zlefent ket en em zisprizout, en em zismegañsiñ, en em gunujennañ ha stourm an eil re ouzh ar re all evel maz eo c'hoarvezet re alies.

La egalite (Bey, Karamit)

D'an eil, poent eo d'ar stourmerion diatebek a vez o c'hoari dispac'h bihan paouez gant o zaolioù. N'o deus ster na talvoudegezh ebet er c'hendegouezh politikel a vremañ ; re aes eo d'ar gerreizh atizañ hag implijout anezho.

Erfin, n'o deus ar stourmerion vrezhon nemet un difenn : ar c'hedveno etrevroadel ha, moarvat, da gentañ, hini ar broioù keltiek. Gwalleget pe zisprizet eo an darempredoù-se gant stourmerion a zo prest da lec'hiañ bepred o stourm e rez ar 'c'hwec'hkogn'. Ha padal, sur eo, en tu-hont d'ar buzad a zeufe dezho war dachenn ar sevenadur e unan e c'hounezfe an emsaverion ur gwarant priziuz e-keñver nep gwaskerezh a glaskfe o enkañ hag o distrujañ warc'hoazi

N'eus forzh penaos ne vo tizhet pal ebet hep frammañ aozadurioù start e diabarzh an emsav hag hep steuñ un emglev bennak etrezo. Hogen setu dres gwan al luskad brezhon a chom bepred romantel, emdarzhek ha bruzhunek. E sigur an darvoudoù ez eus bet kavet kantadoù a re yaouank evit kemer perzh en diskeladegoù ha diskanañ luganoù a-du gant ar 'FLB' e Roazhon, e Gwengamp, - da geñver 'Devezh ar Brezhoneg' - pe e Kemper. Hogen er-maez eus an diskeladegoù-se ne ra ar re yaouank netra ; n'int ezel eus stroll ebet ; ne studiont ket ar yezh. Youc'hadegoù ha dibunadegoù avat n'int ket evit krouiñ broad vrezhon ebet. Ma n'eus broad vrezhon ebet, evi petra ha piv goulenn ar frankiz hag ober embann d'un 'Talbenn Dieubiñ Breizh' a chom tasmantel a-hend-all ?

Deuet eo ar pred d'ar stourmerion yaouank soñjal ez eo echu amzer ar romantelezh hag ez eo rekiz bremañ stourm a-zevri hag en un doare poellek evit ar vro.

I.S.

RAKKEMENN D'AN DAOU BENNAD DA HEUL

Kavet e vo amañ war-lerc'h daou bennad aozet e brezhoneg diwar levr ar skrivagner kembraek Pennar Davies (1) "Y BRENIN ALLTUD" ("Ar Roue harluet") a zo bet embannet e 1974 (meur a lodenn eus an oberenn-mañ, avat, a a zo deuet er-maez a-ziagent e-barzh kelaouennoù a-barzh bezañ adembannet el levrenn-mañ). Soñjet em eus avat e talvez ar boan lakaat e brezhoneg skridoù a denne da grafoù ha kudennoù bet studiet pe veneget e-barzh IMBOURC 'H hevle- ne, hini Dibenn an Istor hag an Arvezañs, da skouer.

Dudi ha buz am eus kavet o lenn er bloaz-mañ un toullad levrioù savet gant protestanted Kembre diwar-benn kudennoù ar Feiz. Marteze e rin anv anezho tro pe dro ha marteze, ivez, e troin pennad pe bennad diouto e brezhoneg. Evit ar wech-mañ avat e vo a-walc'h an daou bennad-mañ war-lerc'h.

Moarvat e c'hell hiniennoù en em c'houleñn peseurt gounid a c'hell tennañ ur brogarour breizhat katolik diwar zaremprediñ protestanted Kembre. Aes eo respont d'ar goulenn-se. Emañ Protestanted Kembre o talañ ouzh an hevelep argerzh a zigravezadur a zo oc'h ober e reuz e Breizh. Daoust ma van diforc'hoù meizañ pouezus e-keñver Feiz hag Iliz etre Protestanted zo hag ar Gatoliked reizhkred e ranker gwiriañ ez eus, er pleustr, diforc'hoù ken don, ma n'eo ket donoc'h, etre rummadoù ketep a gristenion a ra anezho katoliked hag a zo degemeret, zoken, da gatoliked gant pennadurezhioù an Iliz, m'en em gav ar gatoliked hengounel a-wechoù tostoc'h da lod Protestanted eget da gatoliked zo o deus distaolet, war-bouez, nebeur, holl ziasezoù ar Feiz.

Bezef pe vezef, ar pennadoù da heul am eus dibabet enta dre ma tennont da gudennoù bet studiet ganeomp hevle- lene, evel m'hon eus merket. Kement-se ne lavar ket, evel dres, e tuan da gement a zo displeget er pennadoù-mañ ha n'int ket

(1) Tro am eus bet da gejout gant an ao, Pennar Davies e Kêrdiz e miz Gwengolo 1969, da geñver kendalc'h skrivagnerion ar broioù keltiek. Bez ez eus anezhañ, ma ne fazian ket, ur protestant dizalc'h eus an emdenniezh kentañ ha kelenn a ra en ur skolaj a feizoniezh en Abertawe ; barzh ha romantour kembraek ez eo ouzhpenn. 'Prifathro' ez eo e skolaj feizoniezh Abertawe end-eeun.

dogmennek tamm ebet, n'eus forzh penaos. Ret eo sellout outo evel ouzh danvez prederiañ rak, evidon-me, da skouer, an zav a ran n'em eus ali ebet diwar-benn kudennoù zo. N'on ket desket a-walc'h war ar feizoniezh evit magañ ur soñj fraezh diwar-benn dodenn an Arvezañs, lakaomp. Prest on da grediñ e kloto Dibenn an Istor gant gouremziskouez klodus ar C'hrist d'ar broadoù hogen den ne c'hell empennañ, eveljust, penaos ez anado ar gouremziskouezadur-se, da heul un drouziwezh hag ur burzhud pe dre un hent naturel, koulz lavaret, war-bouez ur c'hantroadur eus an denelezh kendrec'het gant feiz ar gristenion. En degouezh diwezhañ-mañ, avat, penaos e c'hello an Iliz treuzfurmañ kevredigezh an dud ? Evit ar mare, - ha setu perak ez erbedan an 'emdred' d'ar gristenion er mare-mañ dres, - n'he deus an Iliz krog ebet er bed ; pe, a zo gwashoc'h, an darempredoù he deus gantañ ne dennont nemet d'he breinañ ha d'he dizornañ diouzh he c'hefridi piaouel. Se a zo gwir, peurgent, e par an Iliz katolik a gendalc'h d'en em vezañ diwar emdouellioù hag eñvor he meurded tremenet. An "Digoradur d'ar Bed" embannet gant Iliz ar goudevezh Kuzul-Meur evel sturienn hec'h abostolerezh nevez a c'hourvez penna-da-benn war ar c'hammster a roer d'ar ger 'Bed'. Rak goulakaa a ra ur seurt troienn ez eo mat ar 'bed'. Hogen, dres, er c'ho mañ n'en deus ar bed madelezh naturel ebet, zoken, peogwir ez eo dizezet a-grenn war distaoladur Doue hag ar C'hrist (me blijfe din e vefe diskouezet din ar c'hontrol); hag ar mad a zo graet gantañ a zo graet evit an arbenn fall - evit adkemer troienn ar skrivagner saoznek T.S. Eliot, - ha dre se n'en deus talvoudegezh ebet. An Iliz n'he deus ket d'en em zigeriñ d'ar bed, - d'e zistrujañ evit e adsevel hec'h unan, ne lavar an ket, e adsevel en e reizhded hervez he Feiz. Da lavarout eo, un Dispac'h piaouel o deus ar gristenion da gas da benn ; ha, sur-mat, n'eo ket dre harpañ mogerioù ar garnel ez eo deud da vezañ ar gevredigezh kevalaour emanvet frankizour pe vogerioù ar c'harc'har e teu, hep mank, da vezañ ar c'hevredigezioù stadelaour-marksour emanvet sokialour e tizho ar gristenion seveniñ o dispac'h-int o unan. N'o deus ket ar gristenion enta da servijout Stad ebet nag er c'hornog nag er reter er mare-mañ na da glask ganto emglev ebet.

E sigur an dispac'h-mañ avat eo n'on ket evit heuliañ mat mennoz ar skrivagner kembraek. Un emdouell ouzhp eo krediñ, a gav din, e c'hell an dud bezañ gounezet d'ar Feiz

dre skouer vat ar gristenion nemetken (nemet e ve sent wirion anezho holl ha c'hoazho vezañ pezh ez eo fallentez pe laosken-tez natur an darn-vuiañ ne ve ket sur c'hoazh). Sed avat pezh a hañval soñjal ar skrivagner o tisteurel a-grenn keal ar 'brezel' en dispac'h a zo da gas da benn gant ar gristenion a-enep d'o enebourion (rak enebourion o devo bepred ar gristenion ha se a rankfent kounañ bep an amzer). Lakaomp avat n'eo ket mat ar ger 'brezel' e unan peogwir e c'houlakafe e ranko ar gristenion implijout armoù spouronus hollzistrujus mistri kempred ar bed. Gwell eo enta ar verañ ar ger 'feulster' o reiñ da hemañ un eulad ledan. Bezet arabat d'ar gristenion, koulskoude, disoñjal o deus ul labour skarzhañ ha diskar da seveniñ hag hemañ a c'hoarvez eus teurel d'an traoñ ar galloudoù a zo o vac'homañ an dud bremañ ha, peurgent, hini kement Stad impalaour a zo. Rak-se e kredan e tle ar gristenion tennañ o mad eus seul labour tangleuziañ ha gourzhtreiñ a denn da ziskar an impalaouriezhoù a vremañ nemet o tiwall mat, evelkent, - pezh na ra ket nouspet genaoueg a ra anezho kristenion araogelour, - da chom hep reiñ tro da erlec'hiañ impalaouriezhoù all outo. Rak n'eo nemet en ur bed ma vo bet skarzhet dioutañ ar stadelouriezh impalaour e c'hello ar Gristenion krouiñ ur gevredigezh hag ur sevenadur nevez.

A-enep da vistri ar Galloud a vremañ e tle ar feu ster bezañ implijet enta hag a-enep dezho da gentañ. Me a lavar 'da gentañ' rak en ur gevredigezh awenet gant ar gristeniezh zoken e vefe bevennoù d'an damantiz a zo enstag, a-hend-all, ouzh ar gristeniezh. Ne gav ket din e ve lec'h en ur seurt kevredigezh d'ar gwallskoueriezh diroll a ra e reuz er gevredigezh kevalaour marc'hadelour kornogat a vremañ. Ar re vilan, ar re wan a rank bezañ harpet ha diwallet gant ar re a zo gouest d'o heñchañ ha d'o difenn a-enep d'an douellion ha d'an driaklerion maz int kouezhet en o dalc'h hiziv.

Gwelout a reer enta n'omp ket evit degemer ur beoc'helouriezh dizave a rafe eus ar gristenion e Breizh evel er broioù arall un tropellad deñved o vegeliat mat da gas d'al lazhd. D'am soñj ez eo bet mat da vrogarourion Gembre embann ar beoc'helouriezh evel pennaenn diazez etre an daou vrezel hogen ne soñj ket din saviad istorel ur gevredigezh protestant emdennat bezañ keñveriet ouzh hini ar gevredigezh vrezhon bet stummet gant ar gatologiezh.

Ne fell ket' din lavarout a-hend-all ez eo reizh n'eus forzh peseurt feulster e n'eus forzh peseurt kendegeuzh. Ar sponterezh, da skouer, a zo da zisteurel a-grem ; evel araez-emzifenn e tle bezañ arveret ar feuls Diouzh ar sellboent-se e tle bezañ azasaet ouzh ar c'hendegeuzh politikel ha dereziet etre an nann-perzhiakaat, an di-terezh hag ar gourzbellerezh. Gwell ez eo deomp anzav avat ez eo diaes hepkoriñ anezhañ nemet e tle kevateb ouzh stumm argaderezh an enebourion vac'hom end-eeun.

Kent klozañ ar gaoz-mañ e karfen distreiñ war ar c'hraf am eus meneget en deroù hag a zo hini an 'Arvezañs' ha peurgent tezenn Niebuhr a zo meneget er pennadoù-da heul. Lavarout a ra Pennar Davies en e bennad ne c'hell ar gristenion degemer anezhi ma fell dezho ren un obererezh istorel er bed (hervez Niebuhr enta ez eo dic'hallus kris ar bed). O prederiañ ne gav ket din ez eo diabell-weled an Arvezañs sellet evel heuliad kanttroidigezh an denelezh er bed he fezh e dibenn an amzerioù, un amleg ret-holl da obererezh ar gristenion a fell dezho kemer perzh en istor. Empennañ e c'heller e ve a-walc'h d'ar gristenion diwall o c'humuniezhañ amañ hag a-hont en ur bed dinevetek evit kantreizhañ ar stourm a renfent (ha kement-se a zo gwir ivez evit pep bro). Un dañjer a zo a-hend-all e goanag an Arvezañs a zeufe da vezañ ur gredenn diogel : lakaat a rafe ar gristenion da soñjal - evel ma ra ar varksourion - ez eus rekiptoù asur evit pal krog en istor ar bed, e ve a-walc'h dezrannañ hag oberiañ evit tizhout ur pal asur. Mestr an Istor eo Doue ha ne c'hell ket mab-den raktresañ e hentoù penn-da-benn hep e ziskarzhañ dres diouzh an Istor. Kompren a ran eta savboent Neibuhr d'ar m'en deus fellet d'ar skrivagner-mañ lavarout hepken ne out an Arvezañs bezañ na rakwelet na ragaozet na ragurzhiat gant un denelezh a gemerfe lec'h Doue e unan.

Y.O.

+++++

S I L V I D I G E Z H K E V R E D I G E Z H E L

D'AR B E D

Danvez pennañ an Aviel ez eo kiminiadezh Jezuz a Nazared o tiogeliñ ez eo erru Rouantelezh Doue: bez e c'hell mab-den, war-bouez keuziañ d'e beñ'hedoù ha krediñ, mont tre ennañ. Daoust hag ez eus ur ster kevredigezhel d'ar giminiadezh-se ?

Nebeut tre a feizoniourion hag, e gwirionez, nebeut tre a gristenion a asurfe n'en deus an Aviel netra da lavarout diwar-benn an darempredoù etre an dud e framm ar gevredigezh. Moarvat, kalz a gristenion o deus dianavez-et an darempredoù kevredigezhel hag an hengoun digevredelour-se n'en deus ket kollet e nerzh, pell emañ zoken. Padal, o vezañ ma vev an hinienn en ur gevredigezh, dister tre eo niver ar brezegourion (1)-se hag a ro ar pouez brasañ da silvidigezh an eneoù diwar gouest silvidigezh ar gevredigezh hag a vefe prest, zoken, da asuriñ n'eus kentel ebet diwar-benn kevredigezh a gement a vefe emleget e kiminiadezh an Aviel. Ha koulskoude, a-benn bremañ, giz kozh da sabatuñ eo lakaat e gwel, e-giz ma rafe ur Profed, doare kevredigezhel an Aviel.

Betek nevezik zo e voe prizet an Aviel kevredigezhel e-touez un niver bras a-walc'h a renerion Ilizoù. E-pad ur pennad zoken e vije bet kredet a-walc'h, o sellout ouzh an traoù eus an diavaez da vihanañ, e oa an aviel kevredigezhel-se - war un dro gant ar vodernouriezh kemblac'h dezhañ hag a c'hoarvez eus plediñ gant ar Bibl hag ar fedoù istorel a zo e diazez an emsav kristen en ur stumm skiantel - koulz hag an denelouriezh - a c'hoarvez eus doujañ an Den pe zoujañ doare ha skeudenn Doue en Den - o vont da aloubiñ ar bed kristen. Hogen a-benn bremañ ez eo kengerzhet an hengoun ko'h hidenel en un doare dic'hortoz gant ar feizoniourion-se ha na fell ken dezho, da heul drouziwezhioù ar c'hantved-mañ, klevout komz eus meurded vab-den ha kresk ar sevenadur. Emañ mab-den, eme ar feizoniourion-se, e krabanou ar pec'hed ; bez ez eo e strivadenoù da gas da wir ur gevredigezh reizh hag awenet gant ar Garantez ur rummad a c'hwit-

(1) 'Pregethwr', 'pastor' protestant ar rannilizoù emdennet diouzh an Iliz kefridiel saoz er XVIIvet ha XVIIIvet kantved e-lec'h e reer bepred 'offeiriad' ('beleion') eus ar bastored.

adennoù mantrus ha didec'hus ; emañ mab-den dindan mallozh ar c'houezhadur ha n'eus silvidigezh ebet dezhañ nemet a-ziwar-laez e ve. Eveljust, seurt dodennoù a eztaol ur wirionez a rankomp anzav evit bezañ salvet. Hogen feizoniourion ar Skol a ya alies pelloc'h, betek diogeliñ ez eo ar gevredigezh denel, drezi hec'h unan, pec'herez dre natur hag ez eo ar pec'hed an hini eo a zo kiriek d'an huñvre foll a reer eus salviñ ar gevredigezh ken e vo degemeradus e sell Doue. Kement-se a zisoc'h da lavarout ne c'hell ket mab-den salviñ ar gevredigezh hogen, ivez, ez eo ar silvidigezh-se er-maez eus kelc'h-oberiañ ar Spered-Glan.

Padal, ne c'heller ket skarzhañ diouzh keal Rouantelezh Doue pep eulad kevredigezhel. Gwir eo ez eo 'roueelezh' kentoc'h eget 'bro' eo ster kreiz ar ger 'Rouantelezh' amañ ; war veliezh Doue eo e pouezer ha n'eo ket war ledander ar veliezh-se. Hogen ne c'heller ket soñjal diwar-benn roueelezh nep hini hep soñjal en e sujidi, evel ma ne c'heller ket soñjal diwar-benn tadelezh neb hep soñjal en e vugale.

Evel-se, 'rouantelezh Doue' a dalvez 'roueelezh Doue' war ò bobl ha seurt troienn a zo karget gant un dalvoegezh kevredigezhel. Amañ avat e sav daou c'houlemp. Daoust hag ez eo en Iliz hepken pe, neuze, er 'Bed' e kefleunier mennad kevredigezhel Rouantelezh Doue ? Maz eo er 'Bed' (da lavarout eo, en ur gevredigezh a dud kevastenn d'ar bed), daoust ha bez e c'hellomp goanagiñ e welimp ar rouantelezh en he c'haerañ o reiñ enor d'hor buhez denel er bed-mañ koulz hag en neñvoù en tu all d'al lenn ?

Ne c'heller lakaat douetañs ebet war ar fed e oa diazevidigezh ur gevredigezh salvus darn, da vihanañ, eus ratozh Jezuz a Nazared. Kement-se ne dalv ket e oa e ratozh krouiñ unan bennak eus ar reizhiadoù iliziek a gaver er bed hiziv. Hogen n'eus mar ebet en deus kroget gant savidigezh ur strollad a heulierion. Er ster-se en deus diazevidigezh an Iliz. Daoust, eta, ha mennet e oa an Aviel, en he doare kevredigezhel, evit an Iliz hepken ? Daoust ha Jezuz a oa prest da zilezel ar Bed, evit pezh a zo eus ar gevredigezh, da reolerezh an Droug ?

Ne oa ket. Anat eo e c'houlemp Jezuz digant e heulierion seveniñ rouantelezh Doue en o c'hevredigezh-int o unan hogen kement-se n'eo ket pep tra. Darn eus kefridi

an Iliz eo trec'hiñ ar bed. Lavarout a ra Jezuz ez eo ret d'e heulierion bevañ e sell da zarc'hoù meur an dazont : ret eo dezho bezañ dihun da "reiñ degemer da Vab an Den pa zeuio..." (Luk. XII, 35-46 Q ; Maze, XII, 11-13 M ; Maze, XXV, 1-13 M). Gant donedigezh Vab an Den e pleder penn-da-benn d'an Aviel. A-walc'h eo lavarout amañ ne c'hell ket kement-se talvezout nebeutoc'h eget un Dispac'h e buhez ar 'Bed'.

Evit en em brientiñ war-wel dibenn an oadvezh drouk a vremañ e tle heulierion ar C'hrist prezeg an Aviel d'an holl vroadoù (Mark, XIII, 10 ; kv. Maze, XXVIII, 19). Kefridi an Iliz eo kendrec'hiñ ar Bed (Yann, XVII, 20-25). Dav eo d'an Iliz eta bezañ war zihun hag en em reiñ d'ar bedenn e sell d'an darvoud meur da zont hag a zo hec'h emled dre ar bed holl ; kement-se a lavar ez eo buhez kevredigezhel ar Rouantelezh, a-benn ar fin, patrom ar gevredigezh denel er bed-mañ.

Kadarnaet eo an dra-mañ gant ul lodenn ec'hon eus kelennadurezh ar C'hrist a ziskouez bezañ deuriet meurbet gant kudennoù ar bed-mañ. An deus-se a weler meur a wech. Asuriñ a ra darn n'eus bet gant ar C'hrist heñchadur resis ebet evit pezh a sell ouzh kudennoù e vro hag e vare. Aner eo, da skouer, hervez ar re-se, furchal en Testamant Nevez, war-lerc'h un destenn bennak o tiskouez emañ ar C'hrist o kendaoniñ mac'homerion e amzer pe o kinnig ur respont da gudennoù ar binvidigezh hag ar baourentez, ar brezel hag ar peoc'h, ar vroadelouriezh hag an impalaouriezh. Ar wirionez eo n'eo ket dav furchal : splann eo an testennoù-se evel an deiz, daoust ma n'hon eus en hor c'herz nemet un teskad eus kelennadurezh ar C'hrist ha daoust maz eo skrivet pennañ dielloù an Aviel e sell d'ar misi-onañ e-touez broadoù an impalaeriezh roman ha daoust, erfin, maz eo techet da vat an dielloù-se da ziskouez istor ar C'hrist en ur stumm a c'hellfe gounit grad-vat ar pennadurezhioù roman.

Hep mar ebet en deus distaget ar C'hrist kalz komzoù diwar-benn mac'homerion e amzer ha n'int ket deuet betek ennoomp. Hogen gouzout a reomp e rae fae war mac'herezh "rouaned ar broadoù" (Lukaz, XXII, 25-26 ; Maze, XX, 25-26) ha gwidreoù Herodez (Mark, VIII, 15 ; Lukaz, XIII, 32 L). Bez e oa ar Sadukeidi, - anezho ar Strollad politikel en devoa ar muiañ a levezon, er ster politikel, e-touez Yuzevion Judea, - enebourion douet dezhañ. Barnet e voe gant ar Sanhedrin evel 'emanver Mesiaz' (Mark, XIV, 61-64) ha kroazstaget eo bet evel "Roue ar yuzevion"

metidat (m)

evel blenier politikel d'ar vroad yuzev. Ne c'heller ober eus Jezuz ar C'hrist hep diogeliñ war un dro ez eo "olevad" Israhel hag, hervez an uhelbatrom mesiazel, Roue ar Bed. Disheñvel e oa e roueelezh avat diouzh roueelezhioù boutin ar bed-mañ evel ma lavarere deomp e-barzh Yann, XVIII, 36 ha an diforc'h, evel ma lavar en hevelep frazenn, eo ez eo ur rouantelezh divilourel a-grenn e oa e hini, pezh na dalvez ket ne oa ket o taeañ levierzhioù ar bed roman. Rouantelezh ar Garantez eo Rouantelezh ar C'hrist hogen ar fed-mañ ne ket n'he deus ar rouantelezh-se darempred ebet gant kudennoù ar bed-mañ. Evel m'en diskouez respont Jezuz da Yann-Vadez (Lukaz, VII, 18-23) ez eo yac'hidigezh vurzhdus ar glañvion ha prezegidigezh an Aviel d'ar re baour da vezañ degeme evel arouezioù eus e garg a Vesiaz, evel ur skouer eus ar nozhioù a zeufe stank pa vefe sevenet e Rouantelezh.

Hervez Lukaz, IV, 16-21, ez embannas ar C'hrist a-c'houez d'an holl e oa ster e giminiadezh da gompren dre gevren ouzh un darn eus levr Esaia (KI, 18-23). Emañ an da se avat leun a emskiant kevredigezhel : enni e komzer eus e ar C'heloù Mat d'ar re izel, yec'hed speredel d'ar re vlin, frankiz d'ar sklaved, dieubidigezh d'ar brizonidi ; enni e zer diwar-benn diskuliadur ur bloavezh degemeradus d'an Aot Evel-se enta, en e Aviel, e prezege ar C'hrist ouzh an den evel ouzh ezel ur gevredigezh koulz hag evel un hinienn.

Diskouez aes a c'heller e oa gant ar C'hrist, zoker en notennoù a zo miret en Testamant Nevez, kalz da lavarout diwar-benn ar c'hudennoù arbennik a zo bet meneget uheloc'h hogen amañ ne glaskin ket mont dre ar munud. Dre vras e c'heller evezhiañ ne oa ezhommoù ar teorion biskoazh pell diouzh e galon ; e oa e gelennadurezh diwar-benn pinvidigezh o kendaoniñ koulz pennaenn ar gevalouriezh a ra eus an dastum korvo ur pal dellezek eus buhez vab-den, hag hini ar gevunouriezh danvezelour a lavar ez eo gallus da vab-den bevañ diwar bara an douar hep derc'hel kont eus komzoù Doue ha notennañ a c'heller ouzhpenn En devoa-Eñ kemeret da benn diskoulmañ kudennoù armerzhel buhez vab-den dre seveniñ Rouantelezh Doue. Start eo diskleriañ penaos e c'hell unan diogeliñ a-zevri ez eus tu da lakaat ar brezel da glotañ gant kelennadurezh Jezuz-Krist ; e gwirionez ez eo diazezet pep arnod d'henn ober war ur veizadurezh divezel a zo pell diouzh ar garantez emaberzhus ha gourdrec'hus a ren holl gelennadurezh

divezel Jezuz, e gwirionez war un damkaniezh a lavar ez eo dlead mab-den eo "dibab an droug disterañ" (1) N'eo ket hepken e gelennadurezh hogen e vuhez holl a zo o troukvarn ar brezel ha pep prederouriezh a vez o fiziout en armoù an distrujañ kentoc'h eget en armoù ar c'hrouiñ. Ha lavarout, evel ma ra reoù zo, e c'houlenn e giminiadezh evel Mab-Doue ha Salver ar Bed digantañ dougen ar Groaz-e-lec'h dougen ar C'hleze hep ma vije da c'hortoz diganeomp ober kemendall ne glot tamm ebet gant komzoù fraezh ar C'hrist E unan (Mark, VIII-34). Ha n'eo ket reizh kennebeut diogeliñ e nac'h Jezuz derc'hel kont eus kudennoù frankiz ar broadoù hag ar c'hennlabour etre ar broadoù peogwir ez eus ur 'Zelod' eus Simon, ar broadelour, hag ur 'Publikan' eus Maze, servijer an impalaeriezh, e-touez izli an Daouzeg. Ne ouzomp ket kalz tra diwar-benn Simon hogen gouzout a reomp en devoa Maze dilezet e garg evit heuliañ Jezuz. N'eus arvar ebet e oa ar vroadelouriezh yuzev unan eus elfennoù pennañ e giminiadezh hogen n'eur ket evit nac'hañ kennebeut En deus distaolet hent ar brezel evit dieubiñ e vro hag En deus erbedet ur vroadelouriezh salvus ma vije deuet drezi bennozhioù Rouantelezh Doue d'ar bed a-bezh. Simon kerkoulz ha Maze a c'helle en em gavout en o aez e-barzh luskad ar C'hrist ; n'eo ket en abeg ma tianzave hemañ o c'hudennoù hogen dre ma lakae uhelvennad politikel pep hini da genglotañ en Aviel ar Peoc'h.

Evit an abegoù-se holl ez eo sur a-grenn e oa silvidigezh ar gevredigezh ul lodenn diziouerus eus mennad ar C'hrist oc'h embann e Aviel hag e oa mennet Hemañ, n'eo ket hepken da grouiñ un "Iliz" a sevenfe ar Rouantelezh en e gevredigezh e unan hogen a zegasfe ivez ar silvidigezh d'ar "bed", d'e bobl e unan ha d'an holl bobloù gwitibunan. Evezhiet hon eus endev ouzh pouez ar bedenn a reas Jezuz evit e ziskibion e-barzh Aviel Sant-Yann : "N'eo ket evit ar Bed emañ o pediñ," eme ar C'hrist er bedenn-se (XVII, 9) ha menegiñ a reer ar c'homzoù-mañ a-wechoù evit kadarnaat ar soñj ne gemere ket Jezuz kalz meur er bed hag en e gudennoù hogen diskouez a ra ar peurrest eus ar bedenn emañ o pediñ gredus a-benn d'e heulierion bevañ er Garantez ha kendrec'hiñ ar bed dre se ez

(1) Seurt damkaniezh a zo bet lakaet da dalvezout, da skouer, e Bro-C'hall en addisplegoù o deus graet an eskibion c'hall d'ar gelc'helenn 'Humanae Vitae' pe gant 'kristenion' all o klask didamall ar sioc'hanerezh. (Notenn gant an embanner)



eo bet kaset o C'heneil gant an Tad hag ez eo e garantez s
skeudenn beurlvat a dro-spered ar C'hrouer Meur. Dre skign
pep lec'h ur seurt kendrec'hadur e lakfed un Dispac'h da z
ha kement-se, moarvat ivez, war dachenn ar gevredigezh.

b. (1)

JEZUZ AR YUZEV

A-benn bremañ ez eur tuet da vat e-touez des
(2) an Testamant Nevez da lakaat ar pouezmouezh war levez
'Zeloted' e luskad Jezuz a Nazared (3). Ul lec'h diseurt
S.G.F. Brandon d'an darempred etre an daou luskad e seurt
maz a betek disteurel "keal ar C'hrist peoc'hus" hag ober
Jezuz ur milourelour arloupet. Oscar Cullman ned a ket kei
hogen evitañ da anzav n'eo ket Jezuz ur 'Zelot' e lavar fr
e oa ar 'zelodiezh' keindir e obererezh (4).

N'on ket evit diverrañ en evezhiadennoù uhel
kement testeni a zo diwar-benn kelennadurezh ar C'hrist a-
kudennoù ar gevredigezh e-touez ar Yuzevion, - e ober a-du
ar beorion, da skouer, pe o tifenn gwirioù an dud kozh paou
o c'houlenn reizhded ha trugarez evit ar gwragez. Hogen a-
am eus lavaret evit diskouez ne welan tamm ebet an traoù e
TEGLA (5) e-barzh darn eus e brezegennoù embannet e-barzh
levrenn "Gorchfygu'r byd" (pp.26 h.a.) e-lec'h emañ ar pre
hep sikour ar stummaryourion, o klask uhelaat ar C'hrist,
bouez asuriñ ne oa gantañ deskadurezh kenstag ha sklaer eb
a-zivout krafoù e amzer hag atebegzh kevredigezhel.



- (1) An notenn-mañ a zo bet ouzhpennet a-c'houdevezh gant ar skrivagner.
- (2) "Ysgolheigion" = "Scholars".
- (3) Broadelour hag emsaver yuzev eus amzer ar C'hrist.
- (4) Pledañ a reer gant burutelladurioù ar re-se e-barzh levr sklaer D.R. Griffiths er rummad 'Pantfyedwen' "The New Testament in the Roman State" pp. 50-55, Abertawe 1970.
- (5) Pastor kembreat eus ar rummad kozh ha skrivagner anvek.

A R G O A N A G K E V R E D I G E Z H E L
H A M E N N O Z I O U K E M P R E D

Goude prederiañ diwar-benn testeni an Avieloù
e teu sklaer a-walc'h e ranker dastum ez eo deuet Jezuz-Krist
d'ar bed evel Salver ar Gevredigezh koulz hag evel Yac'haour
an ene hiniennel hag e oa o c'hedal e ve fin d'an oadvezh
drouk a oa o ren hag e krogfe un oadvezh nevez gloriuz gant
trec'h pobl Doue, distrujidigezh pep fallagriezh ha diazez-
idigezh ar Rouantelezh doueel klok evel kevredigezh an dud.
Penaos avat emañ kont gant ar pezh a c'hede Jezuz a Nazared
e gouloù hor gouiziegezh a hiziv ?

Emañ lod o tisteurel e spi dre m'en distaolont
Eñ e unan. Ma kreder ez eus un diskiant o redek war-lerc'h un
teuz eus Jezuz ez eo koulz krediñ n'eus beliegezh ebet e sol
e Aviel. Da gement hini a soñj evel-se ne fell din lavarout
amañ nemet ez eo en Aviel e unan hag en hinideniezh hag e Kroaz
an Aotrou emañ ar veliegezh ha n'eo ket er c'hredennoù a zo bet
stummet war an diazez-se. Hogen darn hag a embann ez eus krist-
enion anezho a nac'h ivez ar 'goanag kevredigezhel' pe, neuze,
douetañs o deus diwar e benn. Burutellet eo bet hemañ ganto
diwar dri savlec'h.

Reoù zo o deus lakaet ar pouezmouezh war an elfen-
noù lec'hel ha yuzevat a oa ennañ ha, peurgent, an testeni a ro
da soñjal edo ar C'hrist o c'hortoz ar 'Parousia' kent diwez ar
c'hantved kentañ. N'eo ket bet kaset da wir ar goanagoù-se en
istor ha dre se, a arguzer, penaos e oufemp-ni asuriñ ez eus un
dalvoudgezh bennak er goanag kreiz-mañ eus ar 'Parousia' ? Maz
eo darn eus an darvoudoù gortozet kemendall a gerseennoù, da-
oust ha n'eus ket bet roet brall da holl veliegezh ar C'hrist
e-keñver dazont ar bed ? Ret eo da bep hini respont ar goulenn
hervez e zoare da gompren an Emgredadur (1). Hogen da unan a
gred ez eo ar C'hrist istorel den koulz ha Doue ne zleje ket be-
zañ dic'hallus degemer ar goulakadur e oa devoud e zended o
c'houlenn, dre ret, e rankfe Jezuz reuziañ ouzh an anaoudegezh-
ioù strizh a oa didec'hus en e varevezh, en e vro hag en e am-
veziadoù e unan : ar re-mañ eo a zo kiriek ma n'ouie ar C'hrist
netra resis a-zivout deiziad ar 'Parousia' ha munudoù all en e
gelennadurezh. Evidon-me ne welan ket e tennfe kement-se netra
diouzh e veliegezh hag e veurded evel Mab Doue ha Salver ar Bed.

(1) 'Enkorfadur'.

Hogen ma kredomp ez eo Mab Doue ha Salver ar Bed ne c'hell ket krediñ n'oa gwirionded ebet gant pennaennoù diazez e gidi ; ha bez ez eo ar mennoz eus trec'h Mab an Den war falliezh ar bed-mañ unan diazez. Houmañ eta a zo ur bennaenn d'n'eo ket hepken dre 'n arbenn m'emañ en tu all da galz noturioù diwar e gelennadurezh a zo deuet betek ennomp hogen dre 'n arbenn ma n'he deus netra da welout gant amveziadoù vuhez douarel e unan. Maz eo an uhelgeal eus Banvez Kevred ezhel ar Rouantelezh goull a-grenn ez eo diaes degemer ar C'hrist evel Aviel Doue ; hogen ma kredomp, er c'hontro ez eo meneget e-barzh Aviel ar C'hrist youl ha mennoz Doue rankomp darbenn ar goanag e vo sevenet ar Rouantelezh e kevedigezh bugale Doue.

Distaolet eo ar goanag-se gant darn en em har war ar fedoù braouac'hus e-keñver an hollved a zo bet diskiet gant gouezoniezh ar c'hantvedoù diwezhañ. Krediñ a ra re-se ez eo ster ar Goanag ez eo war an douar-mañ e vo gwelroueelezh ar sent hag e sigur se e reont goulennoù a laka etañs war ar goanag-se. Petra eo an douar, goude holl, avat nemet ur blanedenn vihan er goulloer ha bedoù marv diniver o vont war-raok en hollved tro-dro ? Piv a oar pe da vare e teuy trubuilhoù an den war an douar da benn da heul un drouwezh eus an natur ? Zoken ma teufed a-benn da ziazezañ war douar un urzh kevredigezhel hag a glotfe gant youl Doue, da ha ne vefe kement-se holl penn-da-benn - a-benn ur pennad a zer berr da drueziañ diouzh e geñveriañ ouzh hoaladoù spour amzeroniezh ar stered - o sankañ en un ankounac'h mezhus lu Ar respont d'ar goulennoù-mañ eo ne echu ket mennad Doue war ar voull-douar-mañ. Krouet En deus an hollved evit anataat garantez ha ne c'hwit ket e ragevezh ma vank darn eus e grouadelezh. N'eus pennaenn nevez ebet er goulennoù-mañ. Ne lak ket marv gouenn vab-den war an douar gwashoc'h kudenn da sel eget marv ur babig nevez ganet. Hag evel ma ne ziskouez ket marv ur babig evit ar c'hristen n'en deus an Istor palster ebet, evel-se ne brou ket marv ur bed leun a dud n'he deus krouadelezh Doue pal na ster ebet. Ne reas ar ouezonie nemet diskouez ez eo leurenn an istor kalz ec'honoc'h eget soñjed a-gent. N'eus ket da grediñ hervez ar feiz kristen e kollo buhez an den he zalvoudegezh pa zeuio an Ankoù nag e kollo buhez ouenn vab-den he zalvoudegezh-hi pa zeuio an di truj war an douar. O vezañ ma kredomp ez eo Doue spered hag

ez aparchant pep tra mat d'an neñvoù speredel ne c'hellomp ket soñjal e vo kollet netra a dalv ar boan e virout e sell Doue. Gant Doue emañ pep madelezh e diogel hag an dismantr a gaver en alvez ne vastar tamm ebet an ober renet gant ar Spered Glan. An talvoud a zo an nerzh e bed ar spered ; pep buhez vadelezh (1) a zo ur galloud speredel e troioù ar grouadelezh. Petra ' vern ma vez lonket buhez an den war an douar gant korzailhenn rankles an Netra Meur ? Kement-se ne dalvez ket e vo bet trec'het Doue na drouzviet ober e Spered e buhez an den. Ne dalvez ket kennebeut ne zeuio ket Mab an Den da zegemer ar gurunenn a Roue war grouadelezh an Uhelañ ; ned eo ket tonkadur ar Grouadelezh diouzh trubuilhoù gouenn na planedenn unanel ebet. D'ar c'hristen ez eo an Netra Meur ur spontailh dizanvez a-grenn.

An trede arguz boutin a-enep da c'hoanag kevredigezhel Aviel ar Rouantelezh ez eo breud lod eus izili al luskad 'nevez-reizhkred' e feizoniezh, ar vezourion-se a bouez adarre war breskadurezh ha breinadurezh natur mab-den hag a gendaon pep meneg a ziazezañ e-touez an dud ur gevredigezh a vo peurvut e-keñver karantez hag a-unvan gant youl Doue. Eztaolet eo bet an dic'hoanag kevredigezhel-se en un doare heverk gant Reinhold Niebuhr a lavar ez eus un uhelvennad dic'hallus eus sevenidigezh Rouantelezh Doue en ur gevredigezh denel. Niebuhr e unan a zo deuriet bras er c'hudennoù kevredigezhel ha lavarout a ra ez eo darn eus ober pep kristen bukañ ouzh an uhelvennad dic'hallus-se hogen ez eo follentez soñjal e c'heller diraez ar pal-se. Eveljust, un daeladenn greñv a zo, er pleustr, a-enep d'ur gelennadurezh a seurt gant houmañ ; ne c'heller ket prezeg anezhi ; ne c'heller ket lavarout d'ur c'hristen boutin e rank skeiñ war-du ur pal bennak ha n'en deus spi ebet da dizhout. E-keñver bred ez eo ur gelennadurezh diboell. Ha, marteze, e c'heller mont pelloc'h ha lavarout n'eo ket darn eus an Aviel ur wirionez ha na oufed prezeg rak ur giminiadezh da brezeg ez eo bet an Aviel a-viskoazh. Hogen seurt mennoz, en tu-hont da se, a zo e dislavar gant kelennadurezh fraezh Jezuz-Krist. N'eus ket anv en Testamant Nevez eus un uhelvennad dic'hallus bennak ; en ebeb, lavarout a ra ar C'hrist (Mark, X,7) ez eo an traoù dic'hallus d'an dud gallus da Zoue ; rouantelezh Doue ez eo ar Rouantelezh, goude holl, ha youl Doue eo ez aparchantfe dezhi kement rann a zo eus ar Grouadelezh. Sur-mat, ned eo ket roll ur c'hristen krennañ war roueelezh ar Roue-Meur. Ne c'hell ket

ur feiz kefleun er C'hrist bezañ laouen o komz eus ar bed-evel eus ur purgator bennak a vije bet ijinet da aprouiñ a sent war-wel an neñvoù a-hont ; ha mar degemerer atebegedzh kevredigezhel an den ne c'hell ket ur feiz kefleun bezañ la kennebeut gant:netra bihanoc'h eget hêrezh klok sent an Uhe Rak dic'hallus eo ur feiz kefleun hep ur goanag kefleun. R eo d'ar goanag ren.

Moarvat e oa ar gredenn gozh er 'gennez' (1) diwar-c'horre ha diyac'hus a-walc'h. Gwir eo e tiskouez Hañvaladennoù ar C'hresk e kelenn ar C'hrist un doare 'ken speredel ha koulz eo deomp kounañ se, - ha kounañ ivez ez un nerzh kuzh bennak na c'hell den e ziskleriañ nag e vest niañ a zo o kenderc'hañ ar 'gennez'-se. Hogen e Dameg an Dr emañ ar fallagriezh o kreskiñ war un dro gant ar vadelezh emañ lodennoù all eus kelennadurezh ar C'hrist o tiskouez o c'hortoz, n'eo ket hepken kennez speredel hogen ivez dro wezhioù ha torfedoù spontus, heskinerezh, mac'herezh ha di Kalz eus ar gristenion gentañ a oa o c'hortoz donedigezh ar Antekrist kerkoulz hag addonedigezh klodveurek ar C'hrist. gouzout a raent piv a oa hêr ar Grouadelezh ha krediñ a ra bagol, e oa ret dezhañ ren.

CH. (Notenn ouzhpennet a-c'houdevezh).
AVIEL AL 'LAZHEGORENNOU' (2).

Bertrand Russell a veze oc'h atahinat ar vevourion dre 'n arbenn ma oa o aviel diwar-benn ar 'gremm bevedel' (an 'élan vital') a zo o redek dre gement elfennig ve war an douarur gelennadurezh skort ha pluezat strizh he red rak plediñ a ra gant an douar-mañ hepken. En tu-hont d'blanedenn emañ ar goulloderioù hag al laezhegorennoù o kelc'troiañ. Darn eus pouezegezh Teilhard de Chardin eo e oa pre da reizharc'hañ (3) al laezhegorennoù evit e Grist. Ne vev ket an 'Addeour' en em enkañ en e vevvennoù, amzer hag egor Hogen deor.p, setu Eñ o tont dreist hor pennoù warc'hoazh beure.

.....

(1) Kresk danvezel ha speredel war un dro, armerzhel, seven urel, derc'haviantel. (2) 'Galaktiezhoù'. (3) Diwar ar c'hebraeg 'hawlio' diwar 'hawl' gwir speredel, goulenn evel ur

ATODENN

Ur gudenn all am dije karet menegiñ er rak-kemenn-mañ e sigur roll ha lec'h ar reiz hag ar preder rik e pleustrerezh politikel ar c'hristen (hag ar 'brezel' a zo lod eus ar pleustrerezh-se). Diouzh maz eo ar politikerezh darn eus an natur kevredigezhel e ranker derc'hel kont eus ar savelezh anezhi. Ne c'heller ket kemer ger-emit-ger kemennoù zo eus an Aviel hag ar vuhezouriezh, dre vras, a zo e dalc'h ar poell. Ar reolenn nemeti a zleer mirout eo hini ar garantez hag an doujañs a zleer reiñ da bep den en e hinideniezh.

E gwirionez, kemennoù diac'hinadek zo ne c'hellont ket bezañ dedalvezet d'ar vuhez pemdez : "Maz out gwallskoueriet gant da lagad, diframm-eñ kuit!" Eztaoliñ a reont hepken un uhelpal ma tleer bukañ outañ hep ma vefe gallus bepred e dizhout.

E gwirionez ne ra ar C'hrist nemet distagañ pennaennoù hollek tre a zivezouriezh a c'hoarvez eus "Bezit peurvat evel maz eo peurvat ho Tad a zo en neñvoù..." pe gourc'hemenn ar Garantez. Dre se e c'heller lavarout e tle buhezouriezh voutin ar c'hristen bezañ awenet gant ar 'c'huzulioù' hogen ne c'hell ket an holl gristenion heuliañ ar 'c'huzulioù' ; a-se ivez, ar vuhezouriezh a bled gant darempredoù an dud e framm ar gevredigezh a zo da vezañ termenet hervez pennaennoù ar 'Garantez' hag ar 'Beurvatted' moarvat hogen ivez hervez ar poell diouzh amveziadoù hag amplegoù ar gevredigezh a bleustro anezhi d'ur mare zo eus hec'h emdro-adur.

Forzh penaos n'eus ket a rekiyeoù buhezgezh pe bolitikerezh e-barzh an Aviel. Da skouer ez eo aner klask ennañ reizhennoù resis diwar-benn kudennoù zo evel - lakaomp - hilastaliñ, sioc'hanañ pe, zoken, dibriediñ ; pa emell ar C'hrist e kuden an dibriediñ, da skouer, e kinnig moarvat un uhelvennad hogen mennet eo neuze, dreist-holl, da zifenn gwirioù ar gwraeg en e gevredigezh-eñ (war ar poent-se e kejan gant aozer ar pennadoù da heul) a-enep da froudennoù ar wazed a veze prest da gas kuit ur vaouez he doa paouezet a blijout dezho ; ken mat eo komprenet emell ar C'hrist ma respont Per 'ne dalv ket ar boan d'ar wazed dimeziñ ma ne c'hellont ket kas o gwreg kuit pa garont..." Hogen e-lec'h-all ez eus anv eus an diskibion a zilez tad, mamm, bugale, gwreg h.a. evit

ar Rouantelezh. Ne ginnige ket ar C'hrist eta ur reolenn dizave. Evit ar brezel, kemendall. Pa ziskleir ar C'hrist "Neb a ra gant ar c'hleze a yelo da goll gant ar c'hleze" ne ra nemet gwiriañ amplegoù ar brezel hag implij an nerz hep dougen war o divoud ur varnadenn c'hroñs. Gwir eo e l ar C'hrist er pennad-se ivez, ma ne fazian ket, n'eo ket rouantelezh eus ar bed-mañ nemet ez eo ret, moarvat, komp an arroudenn-mañ evel un nac'h a-berzh ar C'hrist d'en em lakaat war an hevelep renk gant ar galloud en doa kemeret warnañ e varn. Dezhañ hepken e oa ar veliegezh.

Un diforc'h a ranker ober ivez etre buhezou an hinienn a sell war-eeun outi hag a zibenn diouti hag a vuhezouriezh kevredel-politikel ha n'he deus an hinienn k ebet enni war-eeun. Kemeromp gouennlzhadeg Armeniz pe ar Yuzevion er c'hantved-mañ. Daoust hag e seurt degouezh, e ar pobloù-se, e oa ur ster bennak gant kemenoù ur beoc'h ouriezh a vefe da gavout en Aviel ? Ne gredan ket. Dlead pobloù-se a oa en em zifenn dre an armoù, - m'o dije gelle ober.

Ne oufed kenveriañ an Aviel ouzh ar 'c'hKorapz, zoken, an Testamant Kozh e-lec'h e kaver rekipeoù evit ue gevredigezh lavaret (ha ne gaver ket, eveljust diwar-be ar brezel pe implij ar feulster ; a-hend-all ne oa ket ar C'hrist un enep-milourelour arloupet ; anez, n'en dije bet darempred ebet gant kantener an Aviel end-eeun). An Aviel, enta, a ginnig pennaennoù buhezegezh hogen lezel a ra an dieub da zibab, hervez ar poell, o divezouriezh. Moarvat i e vint barnet hervez an dibab o devo graet. Hogen ar riskl a zo ivez priz o rezid.

NOTENNOU DIWAR-BENN

TUAD AN HENGOU NELOURIEZH

EN ILIZ A VREMAÑ

Embannet hon eus ur pennad diwar-benn stad an Iliz e Breizh en niverenn 64-65 hag embann a reomp en niverenn-mañ un notenn glokaat ha reizhañ a-zivout niver ar veleion en eskopti Sant-Brieg. Ur wech bennak e vouldimp un notenn all bennak diwar-benn obererezh ar'sektennoù'e Breizh.

En niverenn-mañ avat e klaskimp reñf un alberz eus natur ha ster an tuad 'hengounelour' en Iliz katolik.

Nevez zo hon eus bet tro da selaou e Roazhon e Sal ar Geoded ur brezegenn diwar-benn mennadoù an tuad-se gant an ao. 'n eskob Lefebvre, rener ar c'hloerdi'hengounelour' en Econnes e Suis.

Evit dazlec'hiañ ar prezegenn e ranker gouzout ez eus bet anezhañ eskob Dakar ha pennrener 'Urzh ar Spered Santel' nemet ez eo bet dizornet eus ar garg-se e 1968 pa oa deuet ar muianiver eus poellgor-ren an Urzh-se da vouezhiañ a-enep dezhañ. Abaoe en deus diazezet an Aotrou Lefebvre ur c'hloerdi 'hengounelour' e Econnes enta hag ennañ e vez stummet an danvez beleion evel danvez menec'h, war-bouez nebeut, evel ma veze graet gwechall. Diaesterioù e-leizh en deus bet ar c'hloerdi-se peogwir ez eus bet nevez lamet digentañ kaougantadur an Iliz a-berzh eskopti Lausanne e-lec'h emañ diazezet ar c'hloerdi. Graet en deus an Aotrou Lefebvre galv e Roma hogen betek henn n'eus bet kemeret disentez ebet a-zivout e vread.

A-raok komz eus savlec'h ha mennadoù an tuad 'hengounelour' e karfen brastresañ tonkad ar c'hloerdi evel m'eo meizet ha bet displeget gant e ziazezer e-kerzh e brezegenn e Roazhon.

War hon eus komprenet e vo urzhiet 14 danvez-beleg hevlene ha diwar neuze, ugent bep bloaz. Evel m'emañ enta e klot niver ar studierion er c'hloerdi - ur c'hant bennak - gant niver keitat pep kloerdi eskopti er gallegva e deroù ar c'hantved pe etre an daou vrezel ; da lavarout eo, bez

e vo war-dro kant gwech nebeutoc'h a veleion hengounel en amzer-da-zont e Bro-C'hall eget n'eus bet en hanterenn gentañ ar c'hantved-mañ. Hogen daoust ha niverusoc'h kalz egeto e vo ar veleion 'arnevez' a vez kelennet hiziv er c'hloerdiou ordinal ? N'eo ket sur. Re a zizurzh a zo er mare-mañ en Iliz, re amsteriek ha liesseurt ar gelennadurezh a vez displeget er c'hloerdiou evit ma vije dedennet ar re yaouank gant ur velegiezh ha na oar mui den ebe petra eo ar ster hag ar c'halvedigezh anezhi. Lakaomp ent 300 pe 400 danvez kloareg plaen en holl gloerdiou Bro-C'hall ne vo nemet teir pe beder gwech niver ar re a zo bremañ er c'hloerdi hengounelour hag an niver-se a goazho moarva eus an hanter a-barzh ma vo urzhiet an danvez beleion-se.

Hogen petra raio an ao. Lefebvre eus e veleion ? Darn eus ar veleion gentañ a yelo d'ar Stadoù-Unanet, pezh a ziskouez e sell diazezer ar c'hloerdi ouzh ar Riez-se evel mammgeoded riezoù ar c'hornog (pezh ez eo e devoud). Evit ar re all, ne vint ket kaset d'ar parrezioù diwar ar maez pe e kêr daoust ma vo goulenn warno gant ar rouez ma teuy ar veleion da vezañ er bloavezhioù da zont. An abeg eus kement-se eo an disrann a zisparti ar feizidi kenetre er mare-mañ ; bep an amzer e klevet komz eus parrezioù e-lec'h e sav rendael etre hengounelourion hag arnevezourion. Ret mat eo anzav n'o deus ket mui ar re a ra anezho katoliget an hevelep Feiz, ken e-touez ar feizidi razh ken e-tou ar gloer. Setu, kefridi arc'hreriad nevez e vo plediñ hep ken gant ar feizidi hengounel, katekizañ, sakramantiñ h.a. war o goulenn, hag avielañ ivez, moarvat, evelkent (hogen e peseurt doare er bed evel m'emañ bremañ?) Sklaer eo avat ne vo d'an Iliz hengounel, - evel da bep Iliz, - nemet sav iad ur sektern nemetken, ne vern pehini e vo he mennad war an dazont.

Dres, peseurt dazont a zo d'an Iliz hengounel hag hengounelour ? An daou adanv-mañ a implijomp peogwir ez eo moarvat, un diforc'h da ober etre an daou. Ar Feiz hengounel a zo an hini a zo chomet feal da c'her an Diskuliadur hep klask reiñ dezhañ un deveizadur a zistruj an endalc'had anezhañ. An Iliz hengounelour pe 'anterinelour' - evit reiñ un anv bennak dezhi-a vanfe feal ouzpennd'ar reizhiadoù po litikel-kevredadel m'eo bet klenket enno an Iliz end-ee abaoe maz eus ur gristeniezh en Europa. Da lavarout eo, al

ezeo an 'anterinelourion' mirelourion e-keñver politikerezh ha tuta a ra o luskad e-touez kendereoù henvoazel a-du gant kevredadur "an Tron hag an Aoter". Kement-se a ziskleir ivez perak ez int enebet ouzh ar C'huzul-Meur diwezhañ diouzh m'en deus klasket hemañ digeriñ an Iliz d'ar c'healiadurezhioù arnevez a-du gant ar 'frankiz' h.a. Ar prezegenner, da skouer, hag en oc'h asuriñ e chome feal d'ar Pab a nagenne beliezh Vatikan II dre ma oa gouestlet da dermeniñ ur baskouriezh nevez ha n'eo ket dogmennoù ar Feiz ; meneg a reas eus ar 'Syllabus' ha 'Vatikan I' evit barn ar pezh a anve ar 'frankizouriezh'. Burutellañ a reas ivez skañvbennegezh pe faezhiadegezh un uhelgardiad eus ar Vatikan en doa graet e seizh gwellañ e Kolombia evit lakaat disparti etre an Iliz hag ar Stad (notomp avat ez eus bec'h ivez etre an Iliz hag ar Stad e Spagn end-eeun diouzh ma klask an Iliz er riez-se en em zigevarzhañ diouzh ar galloud). Tamall a reas un eskob all dre m'en doa renket savlec'h an Iliz katolik a-unan gant hini an Ilizoù protestant e-pad ur c'hendalc'h euc'haristek e Sydney, ma na fazian ket. H.a.

Den ne gredo lavarout n'o deus savlec'hioù an hengounelourion diazez ebet hogen ne gav ket din-me e ve sklaer bepred en o spered beziadoù ar c'hudennoù a ginnigont un diskoulm dezho. Kemeromp hini ar frankizouriezh hag hini an darempredoù etre an Iliz hag ar Stad. Sur eo ez eus ur frankizouriezh touellus ha dañjerus diouzh ma rofe da grediñ n'eus gwirionez ebet war dachenn ar gravez pe an drabedoni zh, pe c'hoazh ez eo koulz ha kevatal an holl relijionoù hag an holl Ilizoù (kealioù seurt se avat en em sil a-wechoù e diskleriadurioù tud a iliz zo e ser harpañ an oekumenegezh, lakaomp). Kement-se avat a zo un afer a skiantvat, n'eus forzh penaos : petra a soñjit eus ur marc'hadour a lavarfe d'e zanvez arvalion e vefent servijet ken mat e stal an amezeg ? N'eus mar ebet ez eus uhelgargidi eus an Iliz a garfe ober eus houmañ ul led-UNESCO bennak ha netra ken, un aozadur hollvedel a filantropiegezh.

Diouzh un tu all avat ez eo ken sklaer all ivez en c'hall ket an Iliz implijout ar galloud stadel, - lakaet e ve gallus, - evit diogeliñ dazont ar Feiz. A-walc'h a skouerioù hon eus en istor a ilizoù bet breinet ha diskaret gant ar galloud stadel. Hep mont keit all, daoust ha gwell eo

Journal

X
Karom
redat
Karom

stad ar gravez er broioù m'eo manet an Iliz stag ouzh ar
riez evel e Saoz pe e Sveden. Marteze ez eo gwazh. Evel just
e c'hellfed menegiñ skouerioù evel hini Iwerzhon hogen
pezh a fell deomp lavarout ez eo meizet fall peurvuiañ
an darempredoù etre ar Stad hag an Iliz diouzh ma reont
eus ar Stad gwarezourez an Iliz hag eus an Iliz servij-
erez ar Stad, - hag evel-se dres e oa meizet an darempred
où-se dindan ar renadoù kozh hengounel ma hiraezh dezho a
'anterinelourion'. A-hend-all n'eo ket bet gwell ar bed g
Ilizoù 'reizhkred' ar Reter ; eno ivez ez eo bet an Ilizo
matezh an aotrouion bolitikel ha rak-se n'int ket bet
gouest da gemer perzh da vat e buhez ar pobloù.

Diamzeriet ha gwan tre eo enta savboent an 'anter-
inelourion' rak n'eus mui kevredigezh ebet a ve relijiel
en he c'hevaniezh e broioù ar C'hornog hag ar re a zifenn
tezenn ar gevrat pe ar gengrad etre an Iliz hag ar Stad a
zo, e gwirionez, izili diwezhañ ur gevredigezh henvoazel
aet da get hag enket da saviad ar Yuzevion er gristeniezh
en amzer wechall.

Padal, diouzh un tu all, e ranker anzav ne c'hell
Feiz ebet trebadout hep ma vije kevredigezh ar gristenion
ur gevredigezh klok barrek da vastañ da ezhommoù hec'h
izili ; ret eo enta da gevredigezh ar gristenion bezañ
ur gevredigezh dinazel bennak. Hogen peseurt stumm ha
peseurt dezvad a c'hello kaout ar gevredigezh dinazel-se?
Enc emañ ar gudenn. Maz eus bet diskouezet un dra bennak
gan istor ar c'hantvedoù trement en Europa ez eo dres
ne glote ket ar Stadoù hag ar gevredigezh stadel kevalaour
pe vorksour gant natur ha mennad an Iliz ha ne c'helle an
darempredoù a oa kenetrezo disoc'hañ nemet da sujedigezh
ha da zistrujidigezh an Iliz hec'h unan. Ne weler ket mat e
ta peseurt lec'h a c'hellfe an Iliz derc'hel en ur gevredige
arnevez diwanet diouzh berzh-mat ar gevalaouriezh hag emle
ar varsouriezh. Hogen setu dres an dislavar en emzalc'h
an hengounelourion virelour : krediñ a reont bepred en ur
gevredigezh 'werc'hel' - 'réel' evel ma lavare Maurras -
a vefe harp natur an Iliz (1) paz eo sur ez eo steuziet

(1) Moarvat e kaver parrezioù kristen c'hoazh war ar maez
e Breizh hogen kement-se ne lavar ket ez eo ar gevredigezh
vreizhat en he fezh ur gevredigezh kristen hiziv an deiz.

ar gevredigezh 'werc'hel'-se ma huñvreont enni. War ar
marc'had, kalzig eus an hengounelourion c'hall a zo
manet dezho ar spered impalaour gall enebet ouzh an Aviel
paz eus anezhañ azeulerezh ar Stad hag an Urzh derc'houez-
et ganti ; dre se ez eo diaes da vrogarourion vrezhon en
em glevout ha troadañ ganto. Mankout a ra d'an hengounel-
ourion ur preder sirius diwar-benn amplegoù ar Feiz er grez
arnevez ; evel ma c'hoarvez el luskadoù taer ha digenvezet
e paot an istrogelled betek re en o zouez (evel en emsav
a-hend-all) ; gortoz a reont bepred burzhudoù ha drouziwez
ioù e-giz pa vije pouezusoc'h e mennad Ragevezh-Doue koll-
idigezh ar Feiz katolik e Bro-C'hall hiziv eget e Bro-Saoz
pemp kantved zo (e-lec'h n'eus c'hoarvezet netra) ; re a
bouez a roont da ziavaezoù ar relijion war var da gouezhañ
er fetichennouriezh (an arnevezourion avat a zisofj ez eo
an dud 'loened' en ur stumm hag o deus ezhomm eus arouezennoù).
An arvar gwashañ a c'hourdrouz anezho eo strishaat ar relijion
d'ur gealiadurezh miret d'ur metou dispartiet a-grenn diouzh
ar gevredigezh hollel ha dilezel, a-benn ar fin, pep ratozh
da avialañ er-maez eus ar metou-se.

Ha padal o deus sammet an hengounelourion ur gefridi
diziouerus en ur stumm : mirout d'an Diskuliadur e ster gwir-
ion ha diles (an Aviel o vezañ estreget un dastumad berrge-
mennoù filantropek) ; hetin a ranker dezho dreist-holl avat
ur sell spisoc'h ha lemmoc'h war 'werc'helezh' (dres!) ar
gevredigezh m'emañ o vevañ enni.

§§§

ATOLENN

M'em eus intentet mat prezegenn an Aotrou Lefebvre
e vefe bodet beleion (ha leanezed)hengounel e-barzh priol-
dion a vefe karget da bleidiñ gant feizidi ur rannbarzh ben-
nak (kement hag un departamant gall, lakaomp).

Diouzh a ouzomp n'eus Breizhad ebet e kloerdi Econnes.
A-hend-all ez eo diaes gouzout peseurt pouez o deus an hen-
gounelourion e Breizh o vezañ maz int toueziet e-mesk ar
feizidi all. E lec'h pe lec'h war ar maez pe e kêr, e-barzh
tiez prevez, e vez lavaret oferennoù latin a vez pleustret gant
izili eus ar renkad henvoazel (darn anezho, da vihanañ) hogen

ivez gant tud eus ar bobl aet war an oad alies hag a zo chomet stag a galon ouzh al liderezh kozh ; e Roazhon ivez e vez lavaret un oferenn latin bep sul en ur chapel, evel an oferenn vrezhonek hogen ar re a bleustr an oferenn se n'int ket, dre ret, enouestlet en un obererezh hengounelour bennak. Ar pleustrezh-se, e-touez tud ar bobl, da vihanañ, a zo trivliadel dreist-holl, a gav din, ha dre se, n'en deus dazont ebet. Bez e c'heller soñjal ne dalv ket ar boan implijout al latin pa ne vez ket komprenet gant ar selaouerion, nemet evit kanennoù zo, moarvat, hogen re alies ivez ez eo bet direet an oferennoù e 'yezh ar bobl d'un ofis protestant ; hogen houmañ a zo c'hoazh ur gudenn all a zlefe bezañ studiet...

T.G.

~~~~~

D I E L L

Amañ da heul ez embannomp ur pennad-brud bet kaset d'ar Wask gant "Yaouankizoù Penn-a-raok Breizh" evit diskleriañ perak o deus divodet o strollad hag en em staget ouzh "Yaouankiz Komunour Marxour-Leninour Bro-Frañs". Skridaozet eo an diskleriadenn-mañ er skritur udebeek, pezh a ziskouez n'o deus ket ar re yaouank-mañ renaviet a-grenn o zadoù speredel. Padal, evel ma n'omp ket boazet ouzh ar skritur-se hon eus kavet gwell gwiskañ dezhi ar skritur peurunvan.

"Bodet en o c'hwec'hvet kendalc'h, divizet o deus "Yaouankizoù Penn-a-raok Breizh" a-unvouezh lakaat fin d'o strollad. Ha, neuze, stagañ a raint unan hag unan ouzh "Yaouankiz Komunour Marksour-Leninour Bro-Frañs" emañ o stourm e-touez ar vicherourion yaouank, ar beizanted yaouank, e-touez yaouankizoù ar bobl, dindan renerezh "rakward komunour marksour-leninour Bro-Frañs" strollet en-dro da'r gazetenn bemdeziek an "Humanité Rouge".

"NI", kazetenn vizieek evit ar yaouankizoù a oa bet krouet diwar-bouez militanted "Unvaniezh Demokratel Breizh" hag un nebeut reoù yaouank, e miz Kerzu 1969. Ha kelc'hioù NI a oa en em vodet en-dro dezhañ. Unvaniezh kelc'hioù NI a oa bet savet ganto e miz Gwengolo 1970. Ha "Yaouankizoù Penn-a-raok Breizh" emsav yaouankiz UDB anezho neuze ez ofisiel, a oa bet graet diouti e miz Du 1971. Al linenn bolitikel a oa, eveljust, hini UDB : harpañ d'an emglev revisionour-reformour strollad Mitterand, politikacher bourc'hiz, enebour kriz ar vicherourion hag ar pobloù o stourm enep d'ar c'holonialism, ha strollad ar vreizh-komunourion Marchais-Leroy, touellañ labourerion Vreizh en ur glask sevel tabut etrezo hag o breudeur a glas, dre skignañ chaovinism hag an dezenn "Breizh-Trevadenn" (koloni), gaou anezhi toud.

Prim ha prim, gwelout a reas darn er Y.P.B., hag e-barzh an UDB zoken, perzh noazus ar strollad-mañ ; displann e oa da gentañ ha, neuze, ez ae war spisaat. War gresk ez ae an eneberezh er Y.P.B. o welout UDB o kemer perzh e farsadenn votadegoù-deputeed 1973, o harpañ "Program Kumun" bourc'hizion an tu-kleiz, o harpañ dre guzh Stad Israel, faskour, gouennelour hag alouber, enep d'ar pobloù arab ha dreist-holl ar bobl palestinian. Diskleriañ

a reas pevarvet kendalc'h YPB (miz Du 1973) e zisfiziañ ouzh "Unvaniezh an Tu-Kleiz". An terrañ a oa o tont diwa neuze, dre ret. Diwar kudenn votadeg-prezidant miz Mae 1974 e c'hoarvezas. Da votiñ Mitterand e c'halvas UDB en ur zerc'hel d'he linenn a-viskoazh. Harpañ a reas er c'hontrol YPB mennad reizh "Marksourion-Leninourion" an "Humant Rouge" o c'hervel da chom hep votiñ evit stourm da-gaout an Dispac'h.

Pempvet kendalc'h Y.P.B. (Mezheven) a oa bet warnañ lavaret a-nevez peseurt labour hor boa d'ober ; a manifesto a voe degemeret a chome ennañ, e-kichen an tra reizh, fazioù ha traoù displann. Ar pal, hervezañ, sevel ar sokialouriezh e Breizh an hini e oa, e-pad ma vez pal pep komunour sevel ar gomunouriezh en hollved goude bet savet ar sokialouriezh e pep bro. Pa oa Y.P.B. da vezañ anezho, e oa war ziazez "anaoudegezh ar bobl vreton hag he gwirioù broadel". Ar fazi a oa bet ganeomp, a soñjomp, diwar-bouez ur bloavezh stourm ha labourat, ha gant se ho prederiañ e kudenn Vreizh dindan gouloù ar "varksouriezh-leninouriezh" hag ar preder Mao Dze Dong.

Kudenn Vreizh a ranker sellout outi evel ur gudenn minorelezh broadel pe sevenadurel e-barzh Stad Bro-Frañs emañ enni war ar stern prientiñ an dispac'h proleterelel. Ur strollad komunour o terc'hel start da reolennoù peurbadus ar varksouriezh-leninouriezh, bet savet gant Marks, Engels, Lenin, Stalin Mao Dze Dong, renerion istoriek veur, a vez ret holl evit kas an dispac'h da benn ha sevel ar sokialouriezh diwallet gant diktatur ar broleteriezh. Ur strollad seurt se oa adkrouet gant komunourion wir Bro-Frañs e miz Kerzu 1967 : Strollad Komunour Marksour-Leninour Bro-Frañs.

Biskoazh e nep bro n'eus bet un dispac'h proleterelel hep m'he deus ar yaouankiz kemeret a-zevri perzh e stourm. Ar gentel istorel-se a ziskouez pegement a dalvez krouidigezh tost-tre "Yaouankiz Komunour marksour-leninour Bro-Frañs", seul vui ma weler sklaer ne vo ket trec'h an dispac'h proleterelel er vro-mañ hep stourm evit frankiz broadel.

Hag hiziv an deiz moarvat, bez' ez eus risklo bras a vrezel. Ar bed, hag Europa dreist-holl, a zo e-kr

kevezerezh kriz an USA, un impalaeriezh o vont war ziskar, hag an URSS, bro bet sokialour gwechall m'he doa bourc'h-izion nevez, enep-komunour start, kemeret ar galloud enni, ugent vloaz zo. An hini dañjerusañ eo an impalaeriezh rusian : ober a ra gant brud-vat tremenet an Unvaniezh-Soviedel ha kavet he deus en Europa a Gornog mevelion ganto ; ar strolladoù bet komunour gwechall emañ anezho e gwirionez ur bempvet kolonenn o sentiñ ouzh gourc'hemennoù tsared nevez Moskov. Klask a ra ar vrizh-komunourion-se - e Frañs, Marchais, Leroy ha Kanapa, - mestroniañ ar vicherourion en un doare faskour ha distreiñ ar pobloù eus teurel evezh ouzh riskl un argad rusian. Evit talañ efedus ouzh an div c'halloudezh-dreist, en em unaniñ emañ ret ober gant pobloù ar bed ha da gentañ gant Bro-Sina hag Albania. Setu perak emaeomp a-du a-grenn gant palioù divizet gant ar P.C.M.L.F. ("Strollad Komunour Marksour-Leninour Bro-Frañs") e-pad e eil kendalc'h :

"E strivoù pennañ e soñj Strollad Komunour Marksour-Leninour Bro-Frañs e ranko bezañ,

a) evit dihuniñ spered proleteriezh ha pobl Frañs da c'hourdrouzioù ar galloudezhioù-dreist, da gentañ toud sokial-impalaouriezh Rusia ;

b) evit gervel al labourerion eus kêrioù ha diwar ar maez, micherourion, peizanted, intelektualed ha, dre vras, pep brogarour, da aveiñ bremañ a-benn ur brezel-argad hag an aloubadur estrañjour ;

c) evit aozañ ha bleniañ war bep tachenn, politikel ideologiezhel, materiel an emzifenn groñs eus ar frankiz broadel, an harzerezh hirbad ouzh pep argadenn, da zifourkañ en dispac'h proleterelel ha da zegas diazezañ ar sokialouriezh."

BEVET YAOUANKIZ KOMUNOUR MARKSOUR-LENINOUR BRO-FRAÑS !

BEVET UNANIDIGEZH AR VARKSOURION-LENINOURION E-BARZH STROLLAD PENN-A-RAOK AR BROLETERIEZH !

E BREIZH EVEL E BRO-FRAÑS A-BEZH, UN DISKOULM HEFKEN : AN DISPAC'H PROLETEREL !

D'an 19 a viz Mezheven 1975  
+++++

## ADDISPLEG

Meneget hor boa dija mennad ar "Yaouankizoù Araogelour" bet herouezet war hent an Emsav gant an UDB ha nevez graet o soñj ganto kuitaat ar stourm evit Breizh hag emezelañ er Strollad 'maoat' gall.

En he bleuñv ez eo bet ar vaouriezh antronoz miz Mae 1968. E-pad meur a vloaz, da skouer, ez eus bet ur gronnad anezho er Skol-Veur e Roazhon hag embann a raent ur gelaouennig liestennet a oa hec'h anv 'Rennes Révolutionnaire' (liestennet fall put e gwirionez), hag a rae anv bep an amzer eus kudenn ar vroadelezh e Breizh. Hogen anat e oa ivez ne roent ket kalz pouez d'ar gudenn-se.

Diaes eo meizañ ervat tro-soñjal ar vaourion mar ankouaer e savlec'hiont o folitikerezh bepred e par an hollved ; er re-mañ ivez - evel en Ehesbeiz - ez eo krog "katar an hollelaat" (hemañ, moarvat, ned eo nemet un doare eus bredkleñved ar Veurded) ; alese an dave a vez graet d'ar brezel etre Arabed hag Israeliz, eus ar brezel da zont etre Sinaiz ha Rusianed (USA o vezañ tremenet diwar vremañ d'un impalaeriezh war an diskar na dalv ken ar boan komz anezhi). Merzet e vo bet ivez an doare kas ouzh Rusia en em ziskouez er pennad, e-giz m'eo natur da reizhkredidi e-keñver disivouderion ha renavidi. Eeun kenañ eo enta politikerezh ar vaourion-mañ, ken eeun hag hini stalinourion an trede etrevroadelenn : trec'h e vo Sinaiz en trede brezel bed ha drezo e vo ledet ar Feiz marksat reizhkred penn-da-benn an douar. N'eo ket ken sod an doare poellata-se ha ma seblantfe bezañ d'ar c'hentañ sell. Ma lakaer Yougoslavia hag Albania a-gostez e ranke gwiriañ ez eo bet diazezet ar gomunouriezh e Reter Europa, lakaomp, a-drugarez d'al Lu Ruz ; hag an div vro all o deus graet o mad, n'eus forzh penaos, eus faezhidige an Trede Reich alaman e-kerzh an eil brezel bed evit stalia renadoù marksat. Perak, neuze, ne gendalc'h ket ar stourmerion-mañ d'en em harpan war ar Rusianed evit kas war-raok an emgann sokialour ? Setu, dres, pezh a zo start da gompr N'eo ket tamm ebet en abeg d'ar stalinouriezh ha d'he zorfedoù peogwir e venegont Stalin koulz ha Lenin evel un haroz sokialour. An digarez roet ganto eo ez eus bet addiazezet d'ur mare e Rusia ur reizhiad kevredigezhel kloz ha

o lezel ar galloud d'ur renkad nevez a renerion (n'eo ket nevez an tamall ha graet eo bet pellzo da gomunourion Yougoslavia gant Djilas, un digemplegour marksat). Hogen daoust ha n'eo ket bet Lenin ha Stalin kiriek da seurt sonnador ar gevredigezh soviedat, gant an tevet o deus roet d'ar pezh a zo bet anvet ganto "groñsren an dic'hladiezh", da lavarout eo da rener ar Strollad komunour stadel en Unvaniezh Soviedel(1). Gwir eo e kredfe a-walc'h unan he deus klasket Sina gomunour derc'hel da heloc'hted ar gevredigezh war-bouez an "Dispac'h peurbadus" herouezet gant ar Strollad e sigur ar reveulzi a zo bet anvet "Dispac'h sevenadurel" end-eeun. Hogen daoust ha ne vefe ket an Dispac'h peurbadus-se ur vojenn e gwirionez ? Pet eus ar re yaouank a sell ouzh Sina evel ouzh Douar ar Bromesa a oar sinaeg ? Pet anezho a anavez ar gevredigezh sinaat diwar-bouez bezañ bevet enni e-pad meur a vloaz, e-kreiz ar bobl, evel ur Sinaad, eus an diabarzh e gwirionez ? Ur gwengel e chom Sina evito hag o anaoudegezh eus ar rannved-se a zo strishaet d'ar skridoù tarañverezh ha bruderezh a c'hellont pourchas. Rak un deveizadur faoz a-grenn a roont eus an "Dispac'h sevenadurel" e Sina. Hemañ a zo da gompr hervez pennvoniou peurbad istor Sina a zo bet a-viskoazh - evel m'hon eus merket meur a wech - un impalaeriezh divent e-lec'h ez arc'hwel bepred nerzhoù digreizparzhañ ha diempañ a ginnig dalc'hmat distrujañ ar riez. An Dispac'h sevenadurel ned eo bet enta nemet un arnod ouzhpenn abezh ar galloud-kreiz a-benn reoliñ ha sujañ un danvez galloud gladdalc'hel nevez, lec'hel ha rannbarzhel, a glaske kennañ mad eus ar framm komunour nevez evit en em gaderaat. Moarvat ez eus bet implijet ur gealiadurezh bennek evit kas ar c'hrogad da benn ; hogen pal ar c'hrogad-se ned eo ket bet tamm ebet daskoriñ d'an diaz ha d'ar werin un intrudu ha n'o deus bet bet biskoazh, n'eus forzh penaos, abaoe deroù ar renad nevez ; an eil hag egile a van sujet strizh da veli c'houleviañ ar Strollad komunour sinaat. ar c'hontrol eus un darsav emdarzhiek ez eo bet enta (an darsavioù gwirion ovezañ mac'het start kerkent ha m'en em ziskouezont evel m'eo c'hoarvezet nevez zo e

(1) An iskisañ a zo, dres, eo ez eo meneget "Diktatur ar broleteriezh" evel un amkan diziouerus er pennad, e-giz pa vije an "Dic'hladiezh" un dra bennak er-maez eus ar strollad a zo o frammañ anezhi.

kêrioù zo) an Dispac'h sevenadurel ez eus bet graet kement a drouz en-dro dezhañ. Marteze ez eus muioc'h a gevatalded -armerzhel- e-touez Sinaiz eget e meur a vro 'sokialour' all hogen houmañ a zo dleet dreist-holl d'an isdiorreadur armerzhel e unan.

Estreget e sigur Sina, avat, en em ziskouez ar mojennoù hag an dislavaroù e-touez hor Maoiz a Vreizh. Merket hon eus dija pegen diboell eoa tamall ar gevredigez soviedel paz eo bet krouet e gwirionez gant Lenin ha Stali Hogen deomp d'an Trede Brezel Bed rakwelet a galon skañv gant hon dispac'herion dispont ha na zalc'homp ket kont evit degouezh an drouziwezh atomel hollvedel hag a lamfe, moarvat, pep ster diouzh ar stourm marksour (daoust ma lavar lod e vefe Sinaiz prest da zioueriñ 300 milion diwar o 700 milion a annezidi evit tizhout an trec'h) : ar brezel da zont-se avat a ro tro da baotred vMao e Breizh da ober gal en a-raok da... vrogouriezh... ar'Frañsizion'en hor bro ha kement-se e brezhoneg war ar marc'had (peogwir n'eus ket anv e kemerfe Breizhiz perzher brezel a-enep Soviediz eus o fe o unan). Hogen daoust ha war dachenn an enebiezh ouzh Rusi ne gejont ket gant kilstourmerion washañ Bro-C'hall ? N'eo ket kuzhet ouzh neb ez eo eeunet nerzh-lu ar Riez gall a-e d'un danvez-argad a-berzh al Lu Ruz ! Hag evit ar vrogouriezh...c'hall, bezomp dinec'h : war ar poent-se adarre ez ay ar maout didenn kaer gant gwashañ bourc'hizion ar vrose. Me ' lavar deoc'h ne vije ket pell ken na vije atoret ho Maourion c'hall vat a Vreizh, rannvroelourion a zoare gant patrioted triliv an Hegzagon santel. Da grediñ ez eus Breizhiz hiziv o c'hortoz Mao evel ar "Père Noel" evel ma oa gortozet Adolf Hitler gant Breizhiz all evel ur "Père Noel" ivez etre an daou vrezel.

Hogen ken eeunik all eo ar gwel eus ar c'henstokoù a zo o vont en-dro er Reter nesañ hervez an hevelep Maourion. Ar brezel etre Arabed hag Israeliz a ziskouezer deomp evel ur stourm etre araogelourion (Arabed!) ha kilstourmerion impaourion gopret gant an Amerikaned, pezh n'eo deus ster ebet pa ouzer ez eo ar riezoù arab renadoù mirelour beliellour pe vrizharaogelour. Evit Israeliz, nemet asantiñ a rafent da vezañ distrujet evel pobl ha broad, peseurt politikerezh a zo digor dezho nemet en em harpañ

war ar re a fell dezho a-walc'h henn ober ? Lakaet o dije goulennet sikour Sinaiz o touiñ ul le a fealded en o c'heñver, daoust hag ar re-mañ o dije o skoazellet war-bouez koll grad-vat an Arabed er rannved-se ? Kounit penaos e kemmas De Gaulle penn d'ar vazh e politikerezh Bro-C'hall er Reter nesañ en abeg d'an tireoul. Gwir eo ivez, tonkad ur vro, ne vern penaos, ne gont ket pa vez anv a gas da benn an Dispac'h hollvedel hag hini Pobl Vreizh, moarvat ivez, ne laz ket muioc'h eget hini Israeliz.

Pledomp bremañ gant ur vojenn all, hini "Proleteriezh Frañs". Anzav a ra aozer (pe aozerion) ar pennad ez eus bourc'hizion en "Unvaniezh an Tu-Kleiz" hag emañ ar re-se zoken e penn an talbenn (gant Mitterand h.a.) Petra, avat, eo bezañ bourc'hiz ha petra eo bezañ proleter hiziv an deiz ? Maz eo ar bourc'hiz "ar perc'henn kevalla o korvoiñ labourerion" ez eo anat n'eus ket kalz a vourc'hizion ken er C'hornog. Ur proleter e vefe er c'hontrol kement hini a zegemer ur gopr a-berzh ur mestr-labour bennek, embregerezh kevredik pe zigevredik (e devoud e c'heller menegiñ degouezh ur "PDG" ezel eus ar PCF en Okitania, da vihanañ). Erziwezh n'eur ket mui evit reiñ un termenadur diazezet war an armerzh eus ar 'proleter' ; e gwirionez ne chom mui nemet ar stuzegezh evit e zoareañ. Gant piv a avat e vez stummet ar patromoù stuzegezhel hiziv ? Evit darn gant ar rez-bevañ, ar yoc'hstlenn hag ar c'hevredadoù politikel, kravezel ha derc'haviantel, an hevelep strollad o c'hellout avat diskouez an tri arvez-se war un dro. Setu, a-benn ar fin e teu ar broleteriezh da vezañ un dangorenn penn-da-benn, un usframm hervez an damkaniezh varksat. A-benn ar fin e teu ar 'broletered' da vezañ ur rizhenn a vourc'hizion vihan en Europa ar C'hornog evel er Stadoù-Unanet, ha kement-se a zo gwir koulz evit gwiskadoù zo eus ar vicherourion hag evit kargidi hag implijidi vihan a bep seurt. Ne lavaromp ket n'eus ken a beorion pe a dud paour-oc'h eget re all hogen hepken n'eo ket mui kriz a-walc'h tavantegezh an darn-vuiañ evit devoudañ un emskiant a broleteriezh er yoc'h, an holl c'hopriddi, a-hend-all, o talañ ouzh mistri dizanv.

Pezh a zo anat eo ez eo ar ger "proleter" un anvad 'kantouezek' eus an 19vet kantved, karget a drivliadelezh, arouezenn ar re a c'houzañv an direizhded hag a zo

reizh o unan ha, dre se, barnerion o mac'homerion. Seurt ersav a glot a-walc'h gant saviad Breizhizel, e-touez rummoù all, bet gwasket ha dismegañset e-pad kantvedoù met, d'am soñj, n'eo ket un ersav poellek.

En em c'houlemañ a c'heller e penn kont perak o deus ar re yaouank-mañ dilezet ar stourm brezhon. Meur a arbenn o deus bet moarvat. Unan anezho eo n'int ket bet evit gouzañv digenvezder an emsaver brezhon e Breizh ; er metou kleizet pe gleizelour gall a bleustrent e oant o unan penn. Un arbenn all eo emichañs o deus meizet e oa steuziet ar stuzegezh werinel vreizhat orinel (maz int bet e darempred gant ESB e vo bet diskouezet kement-se a-walc'h dezho) ken o deus kavet gwell en em stagañ ouzh ar stuzegezh 'proleterat' gall a zo ledet stank a-walc'h e Breizh diwar vremañ. Erfin, an UDB m'o deus kemeret perzh en he stourm da gentañ n'eo ket bet barrek da ginnig dezho un damkaniezh kevanus hag hollelaus eus ar stourm brezhon en em ziskouez er strollad-se evel ur stourm rannvroel darnel, eus an dia- vaez, da vihanañ.

An darvoud-mañ enta n'eo nemet un azon ouzhpenn eus diaesterioù ha diaezamantoù damkanel an Trede Emsav a rank talañ e Breizh ouzh steuziadur ar stuzegezh henvoaze ma oa ar viridigezh anezhi pennañ arbenn stourm ar c'hentañ hag an eil emsav. An disoc'h eus kement-se eo ne gav ket ar emsaverion reizhabeg ebet ken d'ar stourm a renont nemet di reiñ dezhañ un dalvoudegezh hollel, da lavarout eo, oc'h ober anezhañ un doare kravez, pe o kuitaat anezhañ evit ad- kavout en un emsav all un hollelezh wirionoc'h eget an hini a zo diogelet gant un dousennad a dud. Ne vern e pelec'h avañ emañ an hollelezh-se e chom bepred difetis hag azvanek goude ma klaskfe a-wechoù treiñ d'un hollvedelouriezh fal- taziek herouezet gant ar yoc'hstlenn a ro da grediñ emañ ar pobloù e darempred an eil gant eben penn-da-benn d'an douar ; ne ra ar yoc'hstlenn avat nemet tregemmañ ar moger- ioù-maen a zispartie gwechall ar pobloù e mogerioù-gwer ha na lezont nemet skeudenoù da dremen ; ra soñjor pegen stas eo diazezañ darempredoù gwirion etre ar pobloù keltiek a zo, koulskoude, tost tre an eil d'eben. En diwezh holl e tisoc'h touellwel an hollvedelouriezh da obererezh diski- ant ar c'horrstolloù spontelour evel al Lu Ruz japanat pe

anarkourion Alamagn. Poent e vefe enta da zmkanourion zo pa- ouez a ziheñchañ hag a zigalonekaat ar re yaouank o lakaat da skediñ dirazo dremmwelioù goullo.

Moarvat ez eus un abeg all c'hoazh da gatar an hollelouriezh a laka emsaverion zo da gouezhañ e belbi: kol- lidigezh keal an tonkadur hiniennel an hini eo. An den hiziv ne gav ster ebet d'e vezoud nemet en istor an hollved e ve. Ar gwashañ a zo avat eo dres n'en deus perzh diles ebet en un istor a zo e dalc'h mistri ar Galloud. Hogen houmañ a zo ur gudenn all.

E. GILE

+++++

D R E A R B E D

SPAGN

War a hañval ez eo echu ren ar glevgadour Franco e Spagn. Ma ne varv ket zoken ne c'hello ken assamañ e garg a levier ar Stad spagnat. Dre se ivez e aesoc'h, marteze, ad-reizhañ saviad ar broadoù suj e Spagn, e Katalounia hag Euskadi, peurgent.

E sell ar gleizelourion hag an 'araogelourion' e oa Franco an Diaoul enkorfet ; evit dehouelourion ar pennpellañ, e Bro-C'hall koulz hag e Spagn, e oa un ael a-berzh an Aotrou Doue, hag e renad un uhelbatrom politikel. Kredapl eo, koulskoude, n'eus ket bet eus Franco nag an eil nag egile.

Klask a raimp resizañ ar meizadoù-mañ. Da gentañ eta ne gredomp ket e c'heller keñveriañ Franco ouzh Hitler ha Mussolini, - ouzh De Gaulle, ne lavaran ket, un De Gaulle avat en dije lakaet er pleustr betek ar penn e dezennoù. Gwell pe wazh, ne oa ket Franco un den eus ar bobl pe eus ar vihanvourc'hiziezh tost d'ar bobl, e-giz Hitler pe Mussolini. N'en deus ket kemeret ar galloud kennebeut evel m' o deus graet ar re-mañ, dre hent ar politikerezh, - da heul ur brezel hir ha kriz en deus skarzhet diwar al leurenn politikel kement hini a c'hellje bezañ bet enebour dezhañ. N'eo ket bet Franco un damkanour politikel kennebeut. En em arpet en deus war ar renkadoù hengounel, un Iliz eus deroù ar c'hantved hag ur vourc'hiziezh frankkevalaour, hep klask reoliñ a dost an nerzhoù kevredigezhel-se evel ma klaskas ober Hitler. Perzh dibarek ar renad-se ez eo bet a-hend-all ar brientoù hag an arwarzh deroet d'un Iliz karget da bourchas ur gealiadurezh a-du gant urzh ar Stad, ur roll hengounel e gwirionez en Europa arnevez, betek emled memoziou an Dispac'h gall. Ur seurt politikerezh a c'heller kompren dre bersonelezh Franco e unan a oa, war a hañval, ur c'hatolig gwirion hervez ar patrom a wechall ha n'eo ket dre skritell hepken, evel De Gaulle, emichañs. Kement-se a ziskleir ivez perak e tenne renad Franco d'ar renadoù kozh henvoazel kentoc'h eget d'ar renadoù faskour klasel evel re Italia hag Alamgn, dreist-holl. Seurt renad

a zo bet direizh ha kriz - ha moarvat hep ezhomm ebet, - dreist-holl e-keñver ar broadoù suj d'ar Stad spagnat hogen kalz krisoc'h egetañ eo bet renadoù a bep seurt, faskour, komunour, stadelour ha milourelour a' bep liv en holl rannvedoù. Maz eo gwallskoueriet meur a hini avat ez eo en arbenn d'ar gristeniezh embannet gant ur renad a heuilh, a-benn ar fin, e politikerezh, pennaennoù Macchiavelli ha n'eo ket re an Aviel, evel holl stadoù ar bed betek henn. An dalc'h eo gouzout, eveljust, ha lakaat a c'heller er pleustr pennaennoù an Aviel er politikerezh; ma ne c'heller ket, abat engervel aotrouniezh speredel an Iliz rak touellañ a rafed an dud ouzh henn ober.

Dres, klevout a reer a-wechoù anterinelourion c'hall oc'h hiraezhiñ da renad Franco hag oc'h ober eus ar glevgadour un doare Janed Ark en dije saveteet Spagn diouzh ar gomunouriezh dizoue evel m'he doa ar santez c'hall saveteet Bro-C'hall en a-raok diouzh ar brotestantiezh ! Eunik eo hevelep ragevezhelouriezh rak reiñ a rafe da grediñ en deus ur prantad ken berr ha pemp kant vloaz bennak ur pouez bennak e mennadoù Doue ; ken diankus eo seurt ragevezhelouriezh lag hini an eskob gall Bossuet a rae eus unvanadur an henved dindan beli diharz Roma un ampleg mennet gant Doue evit aesaat emled ar Feiz kristen en Europa, ur meizad diboell a-walc'h pa soñjer he deus an impalaeriezh roman heskinet ar gristeniezh e-pad tri c'hantved bennak ha breinet an Iliz betek ur poent zo o legadiñ dezhi he spered stadelour ha lezanelour (hogen kristenion all a wel hiziv ivez e berzhmat an impalaeriezhoù marksour un efed eus Ragevezh Doue a-benn aotren d'an Aviel bezañ skignet aesoc'h penn-da-benn d'an douar!) Hogen distroomp da Janed Ark hag ar brotestantiezh : istor-faltazi eo empennañ ez eo bet roll ar santez c'hall mirout ouzh Bro-C'hall a zont da vezañ protestant rak n'omp ket sur tamm ebet, da gentañ, e vije bet Harri VIII ebet ma vije bet unanet an div vro dindan an hevelep kurunenn ; ha d'an eil, kerkoulz all e c'hellje bezañ c'hoarvezet ar c'hontrol eus pezh a zo faltaziet gant ar vrizh-hengouelourion c'hall, da lavarout eo e vije chomet Bro-Saoz katolik dindan ur roue deuet marteze d'en em staliañ e kreisteiz e rouantelezh hag o dije ar Saozon peurzesket galleg evel m'o doa kroget da ober dindan ar rouaned norman ; neuze, moarvat, e vije bet gounezet Preden ha Bro-C'hall war

un dro da vennoziou an Dispac'h gall ! Rak, ma n'eo ket bet troet Bro-C'hall d'ur vroad protestant er XVIvet kantved he deus bet gwashoc'h tonkad a-c'houdevezh - e sell ur c'hristen, na petra! - o tont da vezañ ur vroad digredenn hag o skignañ mennoziou an Dispac'h gall daou kantved warlerc'h. Ha n'eus forzh penaos, orin an adreizh protestant hag an Dispac'h gall a zo da glask e stuz kevredadel hag emdroadur politikel hollet an div vro hag Europa penn-da-benn a-hed ar c'hantvedoù ha n'eo ket e darvoudoù a eil-pouez evel ren ur roue bennak pe gemeridigezh ar galloud gant un unpenn bennak daoust ma c'hell hevelep darvoudoù c'hoari ur roll evit ur pennad amzer.

Kement-se a c'heller gwiriañ e sigur tonkadur Franco. Marteze a-walc'h en deus miret ouzh ar strollad komunour a gemer ar galloud e Spagn, daoust ma n'eo ket sur a-grenne vije bet gouest hemañ da dizhout hevelep pal en amzer ar Republik spagnat. Hogen daoust m'he deus gallet an Iliz e Spagn en em vataat eus ur marevezh bleunius evel framm hag aozadur er bloavezhioù war-lerc'h ar brezel diabarzh n'eo ket bet disheñvel bras he zonkad diouzh hini an Iliz c'hall dindan ur renad enebet pe neptu. Da lavarout n'he deus miret an Iliz he levezon nemet er gevredigezh plouezet hag e gennadoù strizh a-walc'h eus ar c'helc'hiadurioù 'hengounelour'. Dre maz eo bet diorreet an ijinerezh hag ar greanterezh diwar lusk ur renad mennet da genkliañ Spagn e kevanenn riezhoù frankkevalour ar C'hornog ez eus diwanet ur renkad micherourion ha kendereoù etre a zo pellaet diouzh an Iliz hag a zo estren ouzh ar relijion er vro-se evel ar peurrest eus Europa ar C'hornog. Gouzañvet he deus an Iliz diwar genstokoù mouchet pe zigor ur gevredigezh diempret etre renkadoù ha broadoù enebet, gant an disoc'h a stader en ur seurt degouezh : rannadur an Iliz hag an arvarouriezh. Da lavarout eo, an hevelep abegoù a zevoud an hevelep gweredoù : anien ar frankkevalouriezh eo dispartiañ ha kevenabiñ perc'henned pe vistri ar c'hevala, micherourion ha rennerion, levierion ha levidi. O tegemer enta ar sevenadur greantel hervez ar patromoù 'kornogat' ez eo bet degaset Spagn (pe e vo degaset ma n'eo ket bet c'hoazh) da zegemer an talvoudoù anezhañ, marteze un doare frankizouriezh diwar-c'horre hogen ivez an efedusted danvezel h.a. a zis-



priz an dud hag a ra anezho binvioù e servij ar c'helc'hiad kenderc'hañ-beveziñ evel en holl vroioù kevalaour ar bed. En ur seurt reizhiad n'eus mui a zarempredoù etre levidi ha levierion ; dre se ez eo diframmet ar gevredigezh ha la-kaet e vefe onest ar renerion ne c'hellont kaout krog na levezon ebet war ar re a zo sujet dezho en un doare dibernel, n'eus forzh penaos.

Ne dalv ket ar boan klask empennañ amañ peseurt goudevezh a vo da renad Franco e Spagn. Gwall hegreidik e ve avat ar gristenion a rafe eus Franco e unan ur Salver eus ar gristeniezh ; kement ha ma ouzon, servijer ar Stad spagnat ez eo bet ha n'eo ket hini an Iliz ; rak an dalc'h eo gouzout ha bez e c'hell ar gristenion hiziv an deiz servijout o Feiz dre aozadurioù a zo estren pe enebet outi, ha se a zo gwir ken evit kristenion an tu-dehoù ken evit re an tu-kleiz, ha n'eo ket, kentoc'h, dre an Iliz end-eeun. Diouzh un tu all ez eo difur d'ar gristenion plegañ d'un doare mojenn eus an dud-veur diwar Ragevezh-Doue paz eo anat ez eo stag tonkad an Iliz hag ar Feiz er par yoc'hel ouzh un tonkad istorel termenet gant ar beziadoù kevredigezhel anezhañ. Moarvat ez eo dlead ar gristenion klask kompren ar beziadoù-se evit gellout o c'hemm diouzh ma harzont ouzh kiminiadezh an Aviel met se, moarvat, ne vo ket graet nag en un devezh nag en ur c'hantved.

~~~~~

PORTUGAL

Arabat e vefe koulskoude keñveriañ da vat Spagn ouzh Portugal ha dezren diouzh nsted ha kerentièzh an div vro e c'hoarvezo a-barzh pell e Spagn ar pezh a zo c'hoarvezet e Portugal.

Disheñvel bras eo saviad an div vro daoust d'ar pezh a c'hell seblantout. Betek ar bloavezhioù diwezhañ ez eo manet Portugal ur vro warlerc'hiet, enni 40% a dud dizesk, 33% a labourerion-douar (14% e 'Bro-C'hall', 4,4% er Stadoù-Unanet). Paour eo ar gounezerezh. 800 000 atant a zo e Portugal hogen diwar an niver-se 700 000 en hanternoz ne zalc'ont ket ouzhpenn 5 hektar, - hag er c'hreisteiz n'eo ket gouest ar gouratantoù da vagañ an devezhourion ; ar re-mañ

avat n'int ket gouest da vagañ an devezhourion ; ac'hano an divroerezh en em fenn dreist-holl e broioù ar c'henvarc'had. Ar c'horvoder dre zen a zo 640 dollar (3.000 e 'Frañs' ha 4.850 er Stadoù-Unanet).

An enkadenn a hiziv a zo diwanet diouzh ar brezel kollet en trevadennoù en deus diskaret ar gevalaouriezh hengounel portugalat en ur reiñ tro da ofisourion yaouank o tont eus ar vihanvourc'hiziezh da emouezañ ouzh gwallsviad ar vro ha na oa digor dazont ebet dirazi.

Ret eo anzav koulskoude n'eo ket gwall sklaer emdroadur politikel Portugal abaoe deroù an hañv tremenet. Eeun a-walc'h e vije bet an traoù ma vije bet unvan "Luskad an Nerzhoù-Lu" hogen n'eo ket tamm ebet hag alese e teu an termadurioù hag ar c'heflusk e levieriezh ar vro (tri gouarnamant da-c'hortoz hag un arnod taol-stad e 18 miz). Ar c'hoari etre ar strolladoù diazezet hervez al lezenn(strollad komunour, strollad sokialour, strollad demokratel-gwerinour) a chom azvanek diouzh ma n'eus en o c'herz nerzh ebet d'en em vataat dioutañ. Dibabet en deus luskad an nerzhoù-lu avat mont da dredeog etrezo ha reoliñ evel-se o lec'h e politikerezh ar vroad. Padal, en abeg da ziempradur politikel al lu e unan ne c'hell ket al luskad sammañ ar roll-se ervat. E-kerzh ar mizioù tremenet, da skouer, ez eus anadet en e greiz un tuad enebet ouzh ar strollad komunour hag a embannas ur manifesto a-du gant al liesstrolladegezh hag ur meni frankizouriezh. A-ziwar-lerc'h an er-sav-se e rankas ar strollad komunour dilezel e vennad da gemer ar galloud a-barzh pell e Portugal. Hogen un tuad all, kleizelour, awenet gant ar M.R.P.P., maoat, a zo en em ziskouezet er c'hazarnioù hag unvezioù zo o deus en em savet a-enep d'ar gouarnamant e-pad an hañv hep ma tisoc'h-je hevelep darsav d'ur brezel diabarzh. Ret eo lavarout e ra holl izili "Luskad an Nerzhoù-lu" sokialourion anezho, nemet darn a-du gant ar genurzh hag ar veli a-zwar-laez, re all o klask korvoñ emdarzhegezh ar gronnadoù diaz e gennadoù zo eus ar werin evit erluskañ un argerzh dispac'h-el. Un dra a zo sur : skoilhet eo bet ar strollad komunour ken e-touez ar boblañs manet feal d'an Iliz en hanternoz ken e-touez an nerzhoù-lu daoust maz eo ar re-mañ dizunvan egiz m'hon eus merket.

Diaes eo da unan er broioù-mañ prizout ervat pouez an nerzhoù-lu er Portugal hogen an titouroù-mañ da heul a c'hello teurel un tamm sklerijenn war an divoud-mañ :

Diwar ur boblañs a ouzhpenn 8 milion a dud emañ el lu ur c'hard eus ar re a zo gouest da zougen armoù. E 1974 edo 175.000 den, da vihanañ, el lu, 135.000 diouto o vezañ en Afrika. An aerlu a c'hoarveze eus 16.000 den, ar morlu eus 18.000, unvezioù ar "Gward Republikan" eus 10.000, ar "Gerreizh diogelroez Led-vilourel" (PSP) eus 15.000. Dre vil e oa 30,83 den el lu (un niver distremenet hepken gant Israel ha Vietnam). An dispignoù milourel a dizhe 7% eus KBK Portugal hogen gopret dister e oa an ofisourion ha dic'hopr - ha dizesk, a-hend-all, - ar soudarded razh. (1) Pa ouzer a-hend-all e oa allies an ofisourion studierion gozh dilabour eus skolioù ijinourion, emskiantek ha digor o spered d'ar mennozioù politikel, broudet o freder gant kudennoù ar brezel dispac'hel en Angola, e veizer gwelloc'h penaos o dije kemeret intrudu ur reveulzi en ur vro a oa chomet morgousket e-pad dekedoù.

Soñjal a c'heller ne bado ket da viken an dizurzh hag an diveli e Portugal ; un harz a vo laket dezho moarvat nemet kredapl eo ne c'hoarvezo ket eno ur c'hilstourm heñvel ouzh hini Spagn 40 vloaz zo pe e Chile nevez zo. Un doare unvanc'hrad a zo el lu evelkent a-zivout ur stumm bennak a sokialouriezh a c'hellfe gwiskañ zoken hini Yougoslavia, lakaomp, hogen a glaskfe en em glenkañ er C'henvarc'had ha dre se e bed ar C'hornog : eno emañ an arvell a zo da skarat, bezañ un Albania nevez digenvez pe, evel Spagn, bezañ kevreet warc'hoazh en un Europa a virfe darempredoù mat gant ar Stadoù-Unanet.

Moarvat ez eo ar Strollad Komunour Portugalat emouez ouzh an dazellad-se ha rak-se ivez ne glask ket kemer ar galloud da vat o vezañ ma ne fell ket dezhañ diaezañ an damenglev a ren etre Kornog hag URSS hiziv. Ret eo kontañ ivez gant levezon an Iliz a chom krefiv hogen n'eus ket da soñjal e c'hellfe an Iliz c'hoari ar roll mirelour a zo bet tonket dezhi e Spagn e-pad ar brezel diabarzh gwechall

(1) Hervez Kenneth Maxwell, meneget gant 'Monthly review', miz Gwengolo.

pa ne vefe nemet en abeg da enkadenn hollvedel an Iliz er mare-mañ. Neuze, moarvat, ar galloud a vo diazezet warc'hoazh e Lisboa a gemero da amkan kentañ adsevel un armerzh rivinet ; er stad m'emañ an traoù e ranko derc'hel d'un urzh strizh, pezh na vo gallus nemet maz eo harpet gant kenasant ar boblañs a chom henvoazel a spered evit ar pep brasañ, oc'h aotren al liesstrolladegezh marteze hogen hep reiñ da hini ebet eus ar strolladoù ur galloud politikel gwirion.

Barnet eo ar vro eta d'un doare bennak a sokialouriezh hogen houmañ a ranko, n'eus forzh penaos, diskoulmañ kudennoù start :

1) un divigad a 17 miliard a skoedoù (1 dolar a dalvez 25 skoed, elese ez eus un divigad a 680 milion dolar e mentel an taladurioù, pezh na ro ket kalz a frankiz diavaez d'ar vro) ;

2) an dilabour ; bez ez eus e Portugal 250.000 den dic'hopr (8% eus ar boblañs, hep kontañ ar soudarded a chom el lu evit bezañ maget, da vihanañ) ;

3) ar c'henderc'h broadel o tigrskiñ ; 6% e 1975 e-keñver 1974. Se ne c'hell ket padout kennebeut.

Arbennik tre eo saviad ar Portugal ha diaes rakwelout an emdroadur anezhañ. Hiniennoù a soñj e c'hellfe tonkad hec'h ez-trevadenn Angola a zle dibab d'an 11 a viz Du a zeu etre ar C'hornog hag ar Reter... nesañ pe bellañ dasskeiñ war hini an ez-vammvro. Marteze, hogen un arvez all a zo d'an dasskoadur-se : 300.000 Angolad gwenn a zo o c'hortoz bezañ advroet ha distreiñ d'ar Portugal. Kredapl e kresko ar re-mañ nerzh al luskad enep-marksour a zo o kreskiñ er mare-mañ e Portugal.

Mat eo kompren ivez ne c'heller ket diazezañ ar sokialouriezh en ur vroad kozh, bihan a-hend-all, eus Europa ar C'hornog, kristen a-viskoazh war ar marc'had, ha pegen warlerc'hiet bennak e ve a-hend-all, evel m'eo bet diazezet en Europa ar Reter gant harp al Lu Ruz ha da heul brezelioù kriz.

#####

295

A-DREUZ LENN

SKOL AN EMSAV. Niverenn 15. Chomlec'h : 30 leurgêr al Lisoù,
35 000 - ROAZHON.

En niverenn-mañ e kaver un toullad pennadoù gouestlet da gudenn ar vroad. Gant emsaverion a bep seurt eo bet aozet ar skridoù-mañ, adal F. Kerraen ha J. Chardronnet betek 'Paotr Skrignag' brudet en emsav en arbenn a'r gelaouenn 'Yod-Kerc'h'. Setu a bep seurt a gaver en dastumad-mañ ha dizunvan a-walc'h eo ar mennozioù a zo displeget ennañ. Pep hini a gavo diouzh e soñj ; evel-se e vo laouenn an holl.

Arat eo n'eus ket tu en un nebeut pennadoù berr evel ar re a zo bet embannet en niverenn-mañ studiañ ervat ur gudenn diaes'hag a zo hini an darempredoù etre ar galloud politikel hag ar gevredigezh. Pezh a verzer dreist-holl a-dreuz darn eus pennadoù ar gelaouenn eo ez eo krog e stourmerion SAE - evel e re ESB ergentaou -ur barrad arvarouriezh en o degas da lakaat e kont diazezoù ur stourm ha na welont ket mat penaos kas da benn : peseurt ster reiñ d'ur pal na greder ken e c'heller tizhout ? Ret eo lavarout, evel m'hon eus merket e ser ESB, n'eo ket an dro-spered-se arbennik da izili SAE ; kontamet eo ganti rummadoù stourmerion liesseurt a zistaol e Breizh ar vroadelouriezh e-giz stourmerion grommadoù zo evel NI o deus divizet nevez zo stourm e par Frañs hag a embann a-hend-all dre se n'eo ket mui Breizh lec'h ur gumuniezh politikel (da lavarout eo, deuet eo ar stourmerion-se holl da vezañ rannvroelourion en-dro ; ma vijent Gallaoued rik, ne rajent mui meneg ebet eus Breizh ha ne rajent mui tamm ebet gant ar brezhoneg ; tro am eus bet avat da gaout eus o ferzh un diskleriadenn e skritur Udebeek o klask reizhabegañ o emzalc'h nevez.(1)

(1) Er-maez eus an emsav e ren ivez an arvarouriezh. Nevez-vurutellouriezh ar varksourion a zo un arvez anezhi ; en Iliz bet katolik e ra he reuz an hevelep arvarouriezh ha stank eo ar "gristenion war glask" (ha na gavint netra biken moarvat rak ur C'hristen a zo un den, dres, en deus kavet un dra bennak daoust ma kejer hiziv gant leanezed o kanañ ar c'hantik "Dans la nuit de notre doute..." a zo nay a-walc'h, memestra, a-berzh tud a feiz, sañset.

N'emañ ket stourmerion SAE erru er par-se c'hoazh hogen war an hent emaint. Spi am eus evelkent e verzint abred a-walc'h pebezh dañjer a zo en un emzalc'h a zegas an emsav d'en em zistrujañ hag a zibouf war an netraouriezh politikel hollek a zo an nor-zigor d'an holl vac'homerezhioù : kaer e vo ober, ne vo ket tu d'ober marksourion wirion eus ar stourmerion a vo bet'kontammet'o spered e stumm pe stumm gant tezennoù ar vroadelourion hag en ur gevredigezh a vo reolet gant marksourion reizhkred ne vo roet biken ur fiziañs leun d'ar stourmerion vroadelour.

Moarvat ez eus hiziv kudennoù o sevel ha n'oa ket anezho dec'h. Evel m'em eus merket va unan pellzo, marv eo ar gevredigezh plouezat ez eus bet klasket diazezañ an emsav warni hag o tizeriañ emañ ar gristeniezh a zo bet sichenn ar gevredigezh plouezat-se. Se avat ne dalv ket ez eo didalvoudekaet en un taol an talvoudoù a oa bet krouet ha miret gant ar gevredigezh plouezat hag an Iliz a-hed ar c'hantvedoù betek hiziv.

Pa vez kont a sevenadur e ranker loc'hañ n'eus forzh penaos, eus ur c'healiad bennak eus an den hag ar vuhez. Ar gudenn enta n'eo ket kemer perzh, koustet a gousto, er gevredigezh evel m'emañ hiziv, oc'h en em harpañ war an nerzhioù a labour enni ha tizhout, dre se, ar galloud politikel ; rak an nerzhioù-se ne glotont ket dre ret gant ar sevenadur hag talvoudoù a fell deomp krouiñ pe virout ; pezh a zo d'ober a zo gortoz ar mare ma vo digor un ode a seblant bezañ serr hiziv evit mont gant an hent hon eus-ni dibabet ; ur seurt mare ne zeuy biken, marteze, ha n'hoc' eus reizhabeg ebet da grediñ e teuy un deiz hogen er-maez eus an degouezh-se n'en deus an emsav na pal na ster ebet.

Kudenn ar vroad hag ar Stad bet meneget er pennadoù-mañ a zo, e gwirionez, kudenn ar galloud hag al lec'heladur anezhañ, ur wech klevet ne c'heller ket krouiñ ur sevenadur a yoc'h hep galloud poli-

tikel, da lavarout eo, hep Stad. En ur stumm enta e c'heller lavarout - ha se hon eus lavaret meur a wech - ez eo tidel betek ur poent a zo - mennad an Emsav da adkrouiñ ur vroad vrezhon ; en ur stumm emamp er par "mann" evel ar Vrezhonez kentañ bet dilestret en Arvorig pemzek kant vloaz zo.

Hogen kinnig kemer perzh er 'stourm etre renkadoù' a-enep d'ar 'gevalaouriezh' evit diskoulmañ kudennoù an Emsav n'en deus ster ebet. Rak, maz eo ar vroad ur vojenn ez eo ar renkad ur vojenn all. A-hend-all, e kement lec'h m'en deus 'renkad an dic'hladidi' kemeret ar galloud n'en deus graet nemet o sammañ kevala ar vourc'hizion hag o wiskañ o chupenn (Reter Europa, Sina ha.) ; dav eo bet d'an'dic'hladidi sevel ur Stad hag ar Stad sokialour o chom heñvel en hec'h anien ouzh an hini 'kevalour'. Rak ar 'Stad' a zo un devoud 'sui generis' ha lemel ar 'berc'hentiezh prevez' ne gemm netra en he natur, e-giz pa vije a-walc'h kengladañ an 'araezioù-kenderc'hañ' evit krouiñ ur sevenadur nevez. E devoud ne ra ar c'hengladadur nemet kempoellañ ar sevenadur ijinerezhel bet aozet gant ar 'vourc'hizion'. Pa weler ez eo frammet an holl strolladoù komunour e Kornog Europa, lakaomp, gant ur rumm a c'hellfed ober anezhi 'bourc'hiziezh stadel' e c'heller kaout douetañs war galloud ar strolladoù-se da grouiñ ur sevenadur nevez. A-hend-all, o vezañ ma chom riek a-grenn ar Stadoù sokialour ez eo tonket dezho - d'ar re c'halloudusañ anezho, da vihanañ, - ren ur politikerezh impalaour, evel ar Stadoù kevalour kemblac'h dezho.

An tu nemetañ da ziskoulmañ ar gudenn enta e vefe, da gentañ, empennañ ur sevenadur nevez a c'hellfe mirout ar pep talvoudusañ eus ar sevenadur ijinerezhel, o tennañ avat ar pep brasañ eus e zanvez eus tiriegezhioù diouzh ment mab-den (evel ma c'hellfe bezañ hini Vreizh) ; hogen anat eo e ranko ar bobl neuze asantiñ d'an dienez, e-pad ur pennad da nebeutañ. War an hent-se avat n'eus kentel ebet da c'hortoz diouzh ar varksouriezh a zo diazezet war ur bedvroeladur eus ar sevenadur.

Un evezhiadenn diwar-benn yezh ar c'haier-mañ. Lod eus ar skrivagnerion, a-ratozh, moarvat, dre drivliadelezh, evit chom stag ouzh o 'c'hornig-bro'a ra gant ur yezh vastard o veskañ yezh lennek ha tref-oedaj (daoust ma tenn yezh Ivon Gaq da hini ar 'C'hilh-og Gall' brudet ergentaou). Peseurt ezhomm implijout stummoù e-giz 'ba' evit'e-barzh' am eus klevet distaget 'e-barss' em amzer-me ? Da grediñ eo ne glev mui ar re yaouank brezhoneg nemet gant paour kaezh kozhidi kollet o holl dent ganto ; nemet e vije an distagadur-se hini ar Strollad E.L.G. bet anavezet mat e deroù ar bloavezhioù seikont e-touez studierion Roazhon, un distagadur a c'hellfed ober anezhañ un distagadur 'chouchennekaet', poblek mat, sur-mat, ha dellezek a-se eus studiadennoù gouziek paotred ar Gevrenn Geltiek e Skolioù-Meur Roazhon ha Brest.

E-keñver skritur ne gomprenet ket mat kennebeut perak e chom S.A.E. sac'het etre ar skritur unvan hag an hini udebeek (houmañ bet burutellet mat gant Per Denez nevez zo) ; a-walc'h a skriturioù a zo evel-se ha peder skritur evit ur yezh hepken a zo memestra un tammig re. Kavout a rae din koulskoude e oa bet boulc'het divizoù e 1971 evit unvaniñ ar yezh ha n'eo ket evit dizunvaniñ anezhi muioc'h. Evidomp-ni, forzh penaos, hon eus displeget alies a-walc'h e oamp a-enep da emell ar galloud politikel - p' un danvez galloud politikel, evel an UDB - en aferioù sevenadurel ; dre se ez eo diaes deomp degemer beli ur gelaouenn embannet ent kefridiel gant ur Strollad politikel, ne vern pegen reizh bennak e ve e vennozioù ha bras gred e stourmerion, a-hend-all.

N'omp ket a-du kennebeut gant implij gerioù amprestet war-eeun diouzh ar galleg evel 'ekonomiezh' hag 'ekonomikel' (perak chom hep implijout d'ar mare-se ar wrizienn - * EKONOM evit ARMERZH, pezh a rofe tu da zeverañ gerioù en un doare kempoell, da vihanañ : EKONOMOUR, EKONOMOURIEZH, EKONOMEK, EKONOMEK h.a. Seurt amprestadennoù ne c'hellont nemet lakaat ar yezh gaonac'h a-benn ar fin.)

HIRIO AN DEIZ gant Mikael Madeg. Embannet gant BRUD. 1975.

Yaouank eo ar skrivagner-mañ daoust ma n'eo ket dianav a-grenn en emsav peogwir en deus kemeret perzh e labour "Al Leur Nevez" hag ar "brezhoneg, yezh vew" ; meur a wech ez eo bet gwelet ivez e kampoù S.A.E.

Diaes eo din barn ar barzhonegoù-mañ a zo savet diouzh ur c'hiz arnevez, hep poentadur ebet a-wechoù, un tamm evel re bP.J. Helias ha dav eo din anzav didro kaer ez eo an darn-vuiañ anezho dreist d'am c'homprennezon dister. A-wechoù, moarvat, e kredo al lenner en devo komprenet un dra bennak hogen ne vo ket sur morse ha dre se e vo un tamm kerseet o serriñ al levrenn en-dro.

Ret eo din lavarout em eus kavet bourrus evelkent un nebeut pezhioù evel 'Gwanwyn' ha 'Troh' hogen re zibaot eo ar seurt pezhioù am eus gallet tañva.

An oberenn-mañ, drezi hec'h unan, a laka unan d'ober soñjoù. Skridaozet eo bet HIRIO AN DEIZ er skritur skolveuriek kozh hag evel ma verk saver ar rakskrid, aozet e oa bet ar skritur hag ar gelaouenn BRUD hec'h unan evit reiñ d'ar 'bobl' da lenn oberenoù aozet en ur brezhoneg 'yac'h' ha 'bev'. HIRIO AN DEIZ avat a zo un oberenn kefredel rik, savet evit kefredourion ha, c'hoazh, kefredourion a zo bet akourseñ ouzh stummoù dibarekañ al lennegezh arnevez (ne lavaran ket se evit tamall, eveljust). Maz eo avat al lennegezh vrezhonek diwar vremañ miret d'ar gefredourion daoust ha talvezout a ra ar boan derc'hel d'ur skritur bet aozet dreist-holl evit aesaat al lenn da vrezhonegerion boblek ha na lennint biken oberenoù seurt-mañ, seul vui maz omp sammet er mare-mañ gant peder skritur bennak ? Setu ur goulenñ a c'heller ober hep bezañ en gortoz e ve roet dezhañ biken ur respont bennak. Evit kaout an oberenn-mañ skrivañ da P.M. MEVEL, 14 impasse Breiz-Izel, 29 200 BREST. Priz : 9 lur.

AR PRINS BIHAN gant St-Exupéry. Lakaet e brezhoneg gant Pierrette Kermoal.

N'em boa ket bet tro, betek henn, da lenn AR PRINS BIHAN. Moarvat, un drovezh bennak e oa bet prenet an oberenn-mañ - e galleg - evit ar vugale peogwir, sañset, ez eo bet savet ar goñchenn-mañ evit bugale hogen abaoe bloavézhioù edo al levrenn manet dilezet war un astell bennak eus un armell-levrion. Setu, dav eo bet din gortoz e vije bet troet e brezhoneg evit ober anaoudegezh gant an oberenn-mañ.

Lavarout a rin da gentañ em eus bet un tamm dudi o lenn al levr-mañ a zo bet troet mat en ur brezhoneg flour hag eeun. Ur wechig bennak, koulskoude, em eus kavet abeg en droienn-mañ-troienn. Kavout a ra din, da skouer, em bije klasket d'ar ger "réverbère" un droidigezh resisoc'h (daoust ma n'on ket sur e vije unan e brezhoneg, 'réverbère' o vezañ stag ouz marevezh ar 'Belle époque' ha karget gant ar varzhoniezh amsteriek a lakaer e kont ar prantad gallese, ... a ra dudi un oberenn evel NENN JENI, a-hend-all).

En em c'houlennet on ivez perak e oa troet e spered ar skrivagnerez lakaat an oberenn-mañ e brezhoneg. E galleg ez eus miliadoù a oberennoù talvoudus ha, neuze, perak dibab an oberenn-mañ kentoc'h eget unan all ? E-keñver bruderezhevit ar yezh, gwir eo, ez eo bet an embannadur-mañ un taol mat ; meneget eo bet war "Le Monde", mar plij, ha klevet em eus ul levrer o lavarout e vez prenet an droidigezh-mañ gant gallegerion netra nemet dre ma oa troidigezh ar PRINS BIHAN, un oberenn c'hallek vrudet. Soñjet em eus ivez e felle d'ar skrivagnerez skoazellañ an tiegezhioù brezhonek a zo ken pouezus evit amzer-dazont ar vro, o pourchas danvez lenn d'ar vugale, pezh a zo ur mennad meulus meurbet, d'am soñj. Koulskoude eo diaes krediñ e vije bet an arbenn-mañ a-walc'h da vroudañ an drocurez da gregiñ gant he labour. Setu, goude prederiañ e vefen tuet a-walc'h da soñjal ez eo bet dedennet Pierrette Kermoal gant danvez an istor

barzhonius-mañ dre ma ro ur skeudenn eus saviad kempred an emsav troet d'ur bedig a faltazi e-lec'h emañ rannet ha serret ar stourmerion e-barzh kemendall a steredennoù distag a-grenn an eil diouzh eben. Dodennoù all a c'hellfe bezañ dizoloet hag addispleget, ev-eljust, hogen didalvez a-walc'h e vefe d'ur buruteller brezhon plediñ gant oberennoù gallek, seul vui maz eo bet graet al labour-se, moarvat, abaoe pellzo gant skridvarnourion c'hall. Va soñj-me diwar-benn troidigezhioù eo e tlefent bezañ aozet diwar oberennoù klasel, moarvat, - hag er c'heñver ez eo gwir ez eo AR PRINS BIHAN un oberenn glasel, - nemet savet e yezhoù n'int ket nemeur anavezet hiziv gant ar Vrezhoneg (lakaomp hen yezhoù pe yezhoù keltiek pe yezhoù zo evel ar re slavek;) o danvez a zlefe tennañ ivez da destennoù prederiañ an emsaverion, Setu, kerseñs em eus kavet evelkent lenn diwar bluenn ar skrivagnerez un droidigezh pa c'hortozed diganti oberennoù gwriennel orinel. Un doare tec'h diouzh an emsav - e-giz m'emañ - eo seurt asant da sevel troidigezhioù diwar skridoù talvoudus, marteze, nemet n'o deus ket un darempred anat gant ar stourm pe ar gevredigezh - ne vern pegen dister e vent - a zo o ren er mare-mañ e Breizh.

Un embannadur kaer tre eo hemañ a-hend-all, moulet brav meurbet ha ennañ skeudennadurioù ar mouladur gallek orin aozet gant ar skrivagner e unan. Ar priz a zo : 33 lur. PREDER, K.R. 16 093 13 Paris.

IH'ELLOU (Garmenig).- Bruzhun. Embannet gant SKOL.

Un dastumad 'sorbiennoù' a ya d'ober danvez al levrig-mañ ha da gentañ e lavarinn diouzhtu ez eo un tammig re danav an embannadenn-mañ : penaos dont a-benn d'he c'hlenkañ war astell ul levraoueg ? Se zo ur gudenn. Marteze e vije bet gwell gortoz ma vije kresket niver ar c'hontadennoù-mañ a-barzh o embann daoust ma n'eo ket disteroc'h an teskad-mañ eget hini PA C'HWEZH AVEL WALARN bet moulet gwechall gozh war ar gelaouenn GWALARN etre an daou vrezel. Lavaromp, a-hend-all ez eo bet moulet bravik ar skrid-mañ,

dre eiltres hogen kempenn kenañ, evel ul levr ordinal ha n'eo ket bet liestennet dre stensil evel niverennoù all eus ar gelaouenn SKOL.

Bezef pe vezef, kalz perzhioù mat en deus an dastumad-mañ a-hend-all. Gant ampartiz he deus aozef Garmenig Ihuellou ar 'sorbiennou'-mañ, darn anezho doareef diouzh sabatuiñ al lenner (moarvat e c'heller anavezout enno ur patrom saoz-amerikan met klenket amañ en ur framm breizhat) ; hemañ a zo degouezh an 'Testamant' pe 'An Naer' pe 'Adenkorfadur' a zo iskis ha skrijus war un dro. E-barzh kontadennoù all en em zamziskouez ar gevredigezh vreizhat evel e-barzh 'Ar Veaj' pe 'Hentig Rozenn' a laka da soñjal un tammig e kontadennoù an etrevezh-brezel, diouzh giz Jakez Riou, lakaomp. Evit pezh a zo eus an emsav ne gejer gantañ nemet en ur gontadenn voursfentus a zo e dalbenn 'Ar Banniel' ma c'heller diverzout ennañ un damgoap teneraef ouzh dodennoù hag albac'hennou an emsav er bloavezhioù c'hwegont (bugale, a-hend-all, a zo 'harozed' ar gontadenn ; daoust ha fellout a rae d'ar skrivagneref diskouez dre se ne oa ket sirius an emsav neuze ? pe daoust hag un hiraef d'an emsav-se evit c'hoari a zo da verzout enni ? Anzav a ranker, n'eus forzh penaos, ez eus ur c'hemm bras etre emsav ar bloavezhioù '60 hag hini ar bloavezhioù '70.)

Reizh hag eeun eo ar yezh dre vras daoust m'em eus kavet un nebeut troiennoù diakuit pe zireizh (d'am soñj-me). Da veuliñ eo ivez implij un nebeut troiennoù eus Kernev a ro un tamm blaz d'an danevellouigoù-mañ. Padal n'on ket a-du evit reiñ d'ar gerioù yezhadurel (araogennoù, lakaomp) ur stumm trefoet (pezh a c'hoarvez mui-ouzh-mui, dreist-holl e-barzh kelaouennoù zo evel POBL VREIZH) : DIBOA e-lec'h ABAOE, da skouer ; ne dalv ar boan arverañ troioù-lavar ha gerioù ur c'horn-bro bennak nemet ma pinvidikaont ar yezh unvan ; ar stummoù pe ar gerioù "kurius" avat ne zegasont netra d'ar yezh ; gouest int avat da lakaat dizurzh er yezh lennek hep bezañ komprenet a-hend-all er-maez eus ur c'hornig-bro bennak.

Kement-se, na petra, ne laka ket disteroc'h

talvoudegezh an oberenn ha spi hon eus hor bo tro da lenn hep dale oberennoù all diwar bluenn ar skrivagneref.

Da brenañ : SKOL. Nnn 62. Ebrel 1975. 9 lur. K.R. YOLA Chariou, 16 st. Berlioz, 22 000 - Sant-Brieg.

MORDREL (Olier).-- La Route Bretonne. KEMPER, "Nature et Bretagne". 38 st. Jeanne d'Arc. 30 lur.

Keit ha ma oa chomet en harlu n'en doa graet Olier MORDREL, bet brudet gwechall en Emsav, nemet war-dro yezhoniezh vrezhonek, e brezhoneg a-hend-all. Nevez zo, avat, abaoe maz eo distroet d'ar vro, en deus embannet daou levr. Unan anezho a zo ur c'hounlevr a ziwar an obererezh en deus renet evel oberour breizhat etre an daou vrezel hag e-pad ar brezel. Evit an darn-vuiañ eus ar seurt kounlevrioù ez eo, evit darn, un doare prezegenn-emzifenn. An talbenn anezhañ a zo "Breiz Atao". Daoust d'ar si hon eus meneget e van an oberenn-se deyrus ha kentelius e meur a geñver ha prizius e vo - evel kounlevr Anna Youenou diwar-benn he fried, Debauvais - da neb a studio istor an eil emsav. "LA ROUTE BRETONNE" avat a zo mennet da vezañ ur burutelladur eus politikerezh luskad brezhon an eil goudevezh-brezel. Mankout a ra, moarvat, un hanez hag un taolennadur resis eus doareoù ha tuadurioù al luskad-se ; ne gav ket deomp en deus bet ar skrivagner amzer da lenn kelaouennoù an trede emsav, da skouer. Padal en deus merzet mat Olier Mordrel tehoù ar bountad breizhek a hiziv ha dre vras e c'heller anzav ez eo reizh a-walc'h ar burutelladur anezho en deus renet. E-barzh IMBOURC'H a-hend-all hon eus diskuliet alies a-walc'h dallentez pe feiz fall ar stourmerion a nac'h gwelout er galloud politikel gall e Breizh kentañ abeg DISTRUJIDIGEZH AR GUMUNIEZH POLITIKEL VREZHON (adsavidigezh ar gumuniezh-se o vezañ pennañ pal an Emsav, na petra!) Se a zo anat a-walc'h hag e gwirionez ez eo hepken un afer a skiant-vat (ken disprizet gant hor

c'hefredourion a hiziv e Breizh). Hogen, war hor meno-
 ni, o deus pleget stourmerion ar c'hentañ goudevezh
 brezel koulz ha re an eil goudevezh d'an hevelep koulz-
 elouriezh ; e-lec'h diorren ur preder politikel brezhon
 dioutañ e unan o deus an eil re hag ar re all degemeret
 ideologiezhoù diouzh ar c'hiz ma soñje dezho o devoa un
 tamm chañs d'ober berzh ha da drec'hiñ (en ur anzav,
 koulskoude, e oa pöellekoc'h, en difetis hag hep derc'h-
 el kont eus talvoud divezel ebet, koulzelouriezh an em-
 saverion o deus gortozet sevenidigezh o mennadoù digant
 'enebourion o enebourion' eget hini emsaverion hon amzer
 ha na c'hellont kontañ nemet war youl-vat mistri nevez ur
 Stad hag a chomo gelenek ouzh o mennadoù keit ha ma vo
 anezhi e-giz m'emañ).

Kement-se, a-hend-all, ne laka ket disteroc'h
 nerzh ar burutelladur renet gant O. Mordrel a-enep d'an
 nevez-koulzelouriezh rannvroelour (ha n'eo ket 'broadel-
 our' ken) ha moarvat e tennfe ar stourmerion yaouank un
 tamm sklerijenn diwar lenn ur seurt levr.

H.K.

KELEIER BERR

D i l a b o u r e B r e i z h

Bez ez eus er mare-mañ e Breizh 42.000 dilabourad;
 ouzhpenn 60.000 moarvat o kontañ rannvro an Naoned ha na
 bar ket er stadegoù embannet a-berzh 'rannvro steuñvek'
 Breizh. Diwar an niver-se, er pevar departamant bepred,
 n'eus nemet 1.400 o touch ur gopr dic'hwel kement ha 90%
 eus o gopr diwezhañ. Kement-se a ziskouez ez eo bet tizhet
 Breizh a-zevri gant an enkil armerzhel en deus nevez graet
 e reuz e Kornog Europa hag e 'Frañs' peurgent.

NOTENNOU DIWAR-BENN

A R M E R Z H B R E I Z H

Ur buraerezh rousin a vo staliet e Konk-
 Kernev. Arnevez tre e vo an teurkadur anezhi, re arnevez
 en ur stumm rak ne implijo nemet un dousennad a dud. Evel-
 kent, reiñ a ray tro d'ar gouerion da brenañ marc'had-mat
 danvezioù druz a rankont pourchas en hanternoz Bro-C'hall
 a-hend-all ; diwar vremañ e c'hounezint 12 gweneg diwar
 ar c'hiload prenet ganto.

R E Z H A F R A M M A D U R A R G O P R O U

E B R E I Z H (nemet rannvro an Naoned)

A-douez an 21 "rannbarzh steuñvek" e 'Frañs'
 ez erru 'Breizh' en 18vet renk evit pezh a zo eus ar go-
 proù ; n'eus nemet 'Normandi-Izel', 'Linguadoc' ha 'Limouzin'
 a zeu war he lerc'h.

Er pesketaerezh hag en ijinerezh ar gremm e
 kaver ar goproù uhelañ ; ar re izelañ a zo da gavout en
 herberc'herezh, e greanterezh al ler hag an dilhad e-
 lec'h ez eus merc'hed o labourat evit ar pep brasañ.

ENKADENN GREANTEREZH AR BOTEIER E FILGER

Ret eo da vistri-labour ar greanterezh e kêr
 Filger goulenn skoazell ar mererezh evit gellout dreist-
 padout. War wall perc'henned an embregerezhioù o unan,
 evit darn, avat, ez eo c'hoarvezet an enkadenn-mañ : miret
 o deus ouzh embregerezhioù eus gennadoù all ar greanterezh
 a zont d'en em stalian e kêr ; gwir eo ivez ne oa ket tomm
 an ijinerezhourion da zont d'en em staliañ e Filger dre maz
 eo diaes stuz kevredigezhel ar gêr-se, enni kenstokoù stank,
 diouzh maz eo ivez ar botaouerezh ur gennad warlerc'hiet.
 Ouzhpenn-se ez eo Filger enkraouiet ha forc'het diouzh he
 c'heindirioù dre ziouer a gehenterezh.

Kement-se a ziskouez a-walc'h ne c'heller ket
 lezel saveleñ ar marc'had da c'hoari hec'h unan pa ranker,
 da gentañ, mirout o gopr d'al labourerion. Ezhomm a zo eus
 steuñverezh hag emell ar galloud foran.

FRANKEMBREGEREZH

Keal ar frankembregerezh ne glot mui gant kalz tra en hon amzer, ken en abeg da emell ar Stad ken en abeg da reolerezh ar galloudoù armerzhel etrevroadel; ne c'hell mui ar Stad hiziv lezel saveleñ an nevid en he roll en abeg d'ar c'henstokoù kevredigezhel ha d'an dispac' a zeufe war-lerc'h an dilabour. Rankout a ra ar Stad enta hanterourifñ evit parrat na rafe freuzstal embregerezhioù zo o deus ur pouez bras en armerzh un taolead bennak. E 'Breizh' (steuñvek bepred) ez eus bet "diouelede" 15 embregerezh a oa war-nes mont d'ar strad.

Dezastum a c'heller eus kement-se e vez reolet an armerzh e 'Frañs' diouzh ur reizhiad vastard hanter kev-alaour hanter sokialour hogen na ro ket perzh na d'ar re a laka an embregerezh da vont en-dro na d'ar c'humuniezhoù lec'hel e tlefent bezañ er servij anezho. Er c'heñver-se ez eo ar c'hedskor e Bro-C'hall ivez ur reizhiad vastard.

"EMGANN AL LINENN-HOUARN"

Soñj a zo moarvat eus ar stourmadenn renet e 1962 evit obten talskeulioù kempouezekaet. Deroet e oa bet ur skoazell arc'hant e sell d'ar c'hempouezekadur-se dres. Gant ar monc'hwezh avat ez eo koazhet talvoudegezh werc'hel ur seurt skoazell ha, da heul, en em gav Breizh adarre er saviad m'edo e 1962. Hogen kredapl eo ez eo uzet nerzh enebifñ ar boblañs pe, neuze, e chom diemouez ouzh an emdro-aur-se rak ne glever den o sevel e vouezh war an divoud-se e Breizh hiziv.

Ret eo lavarout ez eo an SNCF kiriek d'ar gwall saviad-mañ diouzh maz eo kreizennet he rouedad en-dro da Paris hag aozet nemetken e sell da stagañ ar 'rannvroioù' ouzh 'kêrbenn ar vro'.


Kemeromp degouezh ar c'henwerzh etre Spagn ha Saoz. Treizhidellañ a c'hell dre 'Hendaye' ha Dunkirk pe 'Hendaye' ha Rosgo. Dre an hent ez eus 986 klm. eus 'Hendaye' betek Dunkirk, ha 774 eus 'Hendaye' betek Rosgo (da l. eo, 212 klm. nebeutoc'h). Hogen dre al linenn-houarn aozet e 'Frañs' en doare ma ouzer n'eus mui nemet 64 klm. diforc' etre an daou hentadur, elese, 1.196 klm. etre 'Hendaye' ha

Dunkirk ha 1.035 etre 'Hendaye' ha Rosgo. A-benn ar fin avat, gant an talskeulioù kempouezekaet diouzh ar varc'hadourezh e paeo ur c'haser 994 klm. hepken ma tremen dre zDunkirk ha 1.035 klm. ma tremen dre Rosgo. Gwelout a reer adarre an diforc'hoù. Ouzhpennañ a ranker e c'houeuzer amzer ivez o tremen dre zDunkirk dre maz eo dazhentet aesoc'h ha primoc'h ar bagonegoù dre al linenn-se.


Padal seurt diskoulm a zo kollus evit an armerzh rak n'eus forzh penaos ez eo Breizh hent natur ar varc'hadourezh o treizhidellañ etre Spagn ha kreisteiz ha kornog Breizh-Veur, da vihanañ. Nemet, na petra, evit c'hoari ar roll a archant dezhi e rankfe Breizh bezañ gouest da gemenn hec'h unan he c'hehenterezh ha, da gentañ, eveljust, en em vataat eus ar frankiz kenwerzhañ.

GOURHENTOU BREIZH

Rakwelet e 1968 evit 1975



Kaset da benn e 1975



Ar c'hartennoù amañ e-keñver a ro da gom-pren pebezh dale a zo gant al labourioù war an hentoù e Breizh. Aes eo meizañ avat ur wech ouzhpenn ez eo mennet an holl gehentadur em-pennet gant ar mererezh gall e sell da stagañ Breizh ouzh ar broioù krec'h hag ouzh Paris. Sed pezh a anver 'dien-kraouiañ' Breizh. Ne gemer damant ebet ouzh ezhommoù diabarzh ar vro. Pouezus eo ar c'hehenterezh e Breizh, koulskoude, zoken evit an Emsav rak n'eus ket a Emsav hep darempredoù fetis etre an emsaverion.

----- gourhentoù
----- pennhentoù

NIVER AR GOUERION E BREIZH ER BLOAZ 2.000

Hervez ar jedadurioù kaset da benn gant an'INRA'ne vo mui nemet 25.000 kouer e Breizh er bloaz 2.000. Meur a abeg a zo d'an drouziwezh-se. Da gentañ n'o deus mui ar gouerion a vugale. D'an eil, izeloc'h-izelañ eo an dregantad eus bugale al labourerion-douar a stag en-dro gant micher o zud ; da se ez eo kiriek deskrez ar vugale-se end-eeun ; amañ da heul e roomp un daolenn eus ar re a glask ur vicher er-maez eus ar gounezerezh hervez o deskrez :

	<u>Paotred</u>	<u>Merc'hed</u>
Studioù uhel	100%	100%
Kelennerezh kalvezel hir	96%	100%
Stummadur kalvezel berr	98%	90%
Stummadur eilderez eilkelc'hiad	97%	92%
Stummadur eilderez 1añkelc'hiad	91%	79%
Stummadur kentael	64%	68%
Stummadur gounezel berr	44%	53%
Stummadur gounezel keitat & hir	31%	74%

Etre 1980 ha 2000 enta e koazho niver an atantoù da 25.000 - 30.000, dezho pep a 70-80 hektar, en holl 2 000 000 hektar. An dañjer e vo steuziadur ar gouerion etre ha bihan ; chom a ray hepken gourferc'henned - ha na roint trubuilh ebet d'ar gouarnamant gall (sed pezh a fell da hemañ tizhout). An heuliad eus kement-se e vo moarvat pe un ijinerezhadur a zegaso estrenion e Breizh, pe treuzfurmadur ar vro en ur mirva touristel-milourel, hogen ivez kerkoulz all un enkadenn armerzhel grevus a skarzho ar vro eus hec'h annezidi; evit ar poent e vev 50% eus poblañs Vreizh diwar al labour-douar, ez eeun pe ameeun.

Evit pezh a zo eus an emsav, n'eo ket dav pouezañ war an heuliadoù a vo d'ur seurt drouziwezh war an teodyezhoù brezhonek; anat a-walc'h int.


Notit e talvez ar sifroù meneget uheloc'h evit Leon ha Kernev ; hogen sifroù heñvel a vefe kavet er peurrest eus Breizh.

=====

NOTENN. An titouroù-mañ a zo tennet eus 'Entreprises de l'Ouest industriel', niverenn 277, gwengolo 1975, nemet ar pennad diwezhañ a zo tennet an danvez anezhañ eus FER DE LANCE, Nnn 62, kelaouenn c'hweluniadel eus Kemper.

A T O D E N N d'ar pennad diwar-benn STAD AN ILIZ E BREIZH (niv. 65-66)

N'eo ket ket bet intentet mat ganeomp an diskleriadurioù a oa bet kaset ganeomp gant unan eus hor c'henskriverion diwar-benn eskopti Sant-Brieg. An niveroù roet ne bledent ket gant ar veleion beleget bep bloaz e gwirionez hogen gant ar re a zo bet beleget er bloaz-mañ-bloaz hag a zo bev bepred. Setu, evit bezañ sklaeroc'h e kavomp gwellañ moulañ amañ da heul ar 'grugell' kaset deomp gant hor c'henskriver.



+++++

Kendalc'h troidigezh P. KALVEZ diwar "Ar c'hristeniezhoù keltiek" a vo embannet en niverenn a zeu.

-300-

R E I Z H A D E N N O U H A D I V A N K A D U R I O U

E-barzh an niverenn 65-66 :

P.199.- 10 linenn a-raok fin ar bajenn ; ret eo lenn STLENNADOU DANVEZET e-lec'h STLENNADOU DANVEZEL. Ster DANVEZET a zo amañ IMPLIJET. Kv. DEFNYDDIO e kembraeg.

P.200. Nav linenn a-raok fin ar bajenn, lakaat : ARGERZHI O A VEZ O WEREDIÑ e-lec'h SAVELENNOU....

P.201. Trede dilinennad, lenn : "MERKAÑ a ra emañ kendro... e-lec'h "TESTENIAÑ...."

P.201. C'hwec'h linenn a-raok fin ar bajenn : "DIWAR-BOUEZ hentenoù gouezoniell..." a zo da lenn e-lec'h "DIWAR-BENN.."

+++++

En niverenn da zont e klaskimp embann addisplegoù ha burutelladurioù eus oberenn Jil EWAN diwar-benn ar gevan-gevreadelouriezh. Laouen e vefemp o kaout lizhiri war an divoud-se digant hol lennerion.

Embann a raimp arteze un diell bennak ivez diwar-benn an doare ma vez moc'het kelennerezh ar brezhoneg gant kelennerion zo evit digalonekaat an danvez deskarded war ar yezh. War a lavarer deomp e c'hoarvez an dra-se e-barzh skolioù kefridiel. Kavout a ra deomp e ranker herzel ouzh an droug-obererezh-se.

=====

Klaskit koumananterion d'ar gelaouenn. anaoudek e vefemp ivez ouzh ar re a c'hellfe kas deomp profoù pe sevel pennadoù evit ar gelaouenn.

+++++

Moulet gant ar gelaouenn CPPP : 50 015 Ar rener : Y.Ollivi

